


Nº 62 - 1975 Janvies .



Imboubouh

EVEL BOAZ E VO KASET TEIR NIVERENN GENTAN

IMBOURC'H DA GOUMANANTERION 1974.

GOULENN A REOMP START, KOULSKOUDE, DIGANT AL

LENNERION KAS ADAL BREMAN O ADKOUMANANT D'AR

GELAOUENN.....

.....

I M B O U R C ' H , K E L A O U E N N B O L I T I K E L

Niverenn 62

28 c'hwevrer 1975

C'hwec'hvet bloavezh

Taolenn

Danvez labour evit ar bloavezh.....	p.3
Davet ar Prad Du, kounlevr gant Y. Treal.....	p.7
Burutellerezh gant P. Even.....	p.13
Lizhiri.....	p.17
Addispleg.....	p.20
Raklavar da roll an anvioù-lec'h.....	p.23
Roll anvioù-lec'h "Aodoù-an Hanternoz" (darn).....	p.27
Azginivelezh an hebraeg.....	p.35

Koumanant-bloaz : 35 lur. KRP Y. Ollivier
1 534 35 Roazhon. Deraouiñ a ra ar c'houmanant-bloaz
e miz Genver.

Priz an niverenn-mañ : 3 lur 50

Ar pennadoù a zo da gas da Y. Ollivier, 7 bd. A.-
Burloud, 35 000 Roazhon.

CPPP : 50 015

~~~~~

DANVEZ LABOUR

EVIT AR BLOAVE Zh

An niverenn-mañ a zo an hini kentañ eus ur rummad nevez a vo moulet diwar vremañ war ur vent vihan ha dre eiltres adal an niverenn a zeu, spi hon eus.

Dacust ma embannimp, marteze, tro pe dro, - diouzh ma tougint ur ster pe ur gemennadurezh bennak - testennoù lennegel - e vo gouestlet ar gelaouenn-mañ, evel bepred, d'ar studi.

Betek henn hon eus pledet dreist-holl gant kudennoù an emsav. Kenderc'hel a raimp gant an ervenn-se, o klask endonañ avat hon anaoudegezh eus al luskadoù a a zo o vont war-raok e Breizh er mare-mañ hag o stummañ tamm ha tamm hor c'hedveno broadel.

Arnodiñ a raimp ivez arsellout ar c'healiadurezhioù kempred a zo oc'h en em ledañ e Breizh evel e broioù all ar C'hornog. Klask a raimp gwelout ha klotañ a ra ar c'heliadurezhioù-se gant mennad an emsaverion a fell dezho sevel e Breizh ur vroad feal da bennwirionezioù ar gravez kristen. Diouzh ar savboent-se ivez e vimp degaset da studiañ saviad an Iliz e Breizh e

dibenn an ugentvet kantved ha, peurgent, he darempredoù gant an emsav hag ar gevredigezh arveizhat arallek devoudel a vremañ. Esa a raimp termeniñ lec'h ha roll ar graveza kristen en ur gevredigezh vrezhon emskiantek arnevez. Anat eo e vo al lec'h hag ar roll-se disheñvel bras diouzh pezh e oant gwechall en ur gevredigezh vrezveizhat plouezat henvoazel. Degaset e vimp da zisplegañ, moarvat, penaos e sav evit an Iliz hag ar gristeniezh e Breizh an hevelep kudennoù hag evit ar stuzegezh henvoazel hag ar brezhoneg hengounel e Breizh : goude bezañ bet stag e-pad kantvedoù ouzh ur gevredigezh vaezel isdiorreet eo ret dezho, diwar vremañ, emaozañ ouzh ur gevredigezh greantel ha kêrel bet stummet gant mistri digredenn hag estren a-grenn ouzh an talvoudoù relijiel.

Kenstag ouzh hini ar gravez eo hini ar sevenadur dre vras. Ur fazi eo krediñ, d'hor soñj, e c'hell klotañ gant ar gravez kristen n'eus forzh peseurt sevenadur. Daoust hag an diorreadur hag an ijinerezhadur betek ar penn, daoust hag ar gevredigezh veveziñ armerzelour ne zistrujont ket diazezoù pep buhezegezh kristen ? Daoust hag ar "mass media" e dalc'h un nebeut tud - stad pe c'halloudoù armerzhel, -dezho un efederezh divevenn - n'emaint ket e dislavar gant uhelvennad an atebegzh hag ar rezid kristen hiniennel enklozet ivez e keal ar silvidigezh personel, goude ma ve tizhet houmañ a-dreuz hag a-drugarez d'ur stroll ? Hor sevenadur a vremañ eo a zo da vurutellañ

hep disoñjal avat en em lakaomp, dre ar yezh a implijomp, e par ur vroad arallekaet ha kollet ganti pep emskiant evit ar poent, ur vroad n'eus ket anezhi c'hoazh, koulz lavaret, peogwir n'he deus tu ebet da eztaoliñ he buhez; n'eo ket pobl ar Vrezhoned a ra al lezennoù a dermen he zonkad war nep tachenn. Kaer a vo ober, n'eo ket ni a zivizo, da skouer, ha savet e vo en hor bro pe get, an tredanvaoù derc'hanel a zo war var da zisleberañ da vat hon amvevad. Kement-se a zo gwir war n'eus forzh pe-seurt tachenn eus buhez speredel pe zanvezel Breizhiz. O venegiñ ar saviad-se a arallekadur ne fell deomp merkañ nemet e vo broadelour bepred ar savboent a gemerimp evit studiañ ar c'hudennoù a sell ouzh hor pobl.

Ledan eo dremmweliad ar c'hudennoù a sav en hor bro. O klask reiñ un diskoulm dezho avat ne fell ket deomp plegañ d'ur preder brizh politikel e chal hepken gant ur c'hedveno touellet gant mistri kempred ar galloud; se a ra re alies aozadurioù politikel zo a venn dedennañ rummadoù Breizhiz zo - a gleiz pe a zehoù - a zo bet kelennet (da lavarout eo dallet peurvuiañ) gant aozadurioù politikel gall deuet araozo war an dachenn, gant ar spi da zastum un nebeut mouezhioù en un dilennadeg bennak. e Breizh. N'eo ket er pemp bloaz na, zoken, en ugent vloaz da zont e tle soñjal ar stoumerion a zo mennet da dsevel ur vroad vrezhon el ledenez-mañ, hogen e kantvedoù da zont ur grez istorel ha na ra hiziv nemet kregiñ.

=====

DAVET AR PRAD DU

kounlevr gant Youenn TROAL

=====  
Ar pellskrid kentañ o tont eus Jenev (Kreizenn an Divroerezh Europat) a gemenne e oa ret diñ gedal ur miz pad ha loc'hañ eus Cannes, dre vag, d'an 10 a viz Du 1974. Pell avat e kaven da c'hortoz, dreist-holl p'am boa lakaet em soñj sachañ va skasoù ganin a-raok an Hanter-Eost.

Setu, d'al Lun 7 a viz Here, ur pellskrid all kaset eus Suis. "Feurmet ez eus un azezenn evidoc'h en ur c'harr-nij Lufthansa... - ur c'hevredad alaman - a savo eus Orly da seizh eur pergont." Ne c'hellan ket lavarout ne oa ket a bouez war va spered rak en dro-mañ ne oa ket kalz amzer da fringal. Tro er rod neuze ha yao da Gemper, da welout buan ha buan eurioù an tren : evit Pariz. Ha grik ebet d'am c'hoarezed. Perak lakaat meur a hini da gaout d'am heul ur c'houk divalav pa n'eo ket ret ? D'ar meurzh e chome c'hoazh ganin ar vrec'h da lakaat a-enep d'ar vrec'h ! An hevelep ger evit ar c'hleñved hag ar bikurenn. Ul lamm eta betek apotikerdi Sant-Voran (Savorn, Sainte-Marine), kinnig ba brec'h da vezeg Kombrid ha kas da Gemper da siellañ karned melen an testenioù-brec'hidigezh etrevroadel. Amzer vrav a chome c'hoazh ganin da ingalañ, etre daou sac'h, unan kein hag unan dorn, an tregont kiload pouez aotreet din evel divroer. An hini nad a nemet d'ober un droiad a zle kaout e walc'h gant ugent kiload. Un droiad c'hoazh betek Pont h'Abad da glask had legumaj met n'eus ket kalz war ar marc'had d'ar c'houlz-mañ eus ar bloaz.

Ne c'haller ket lavarout e kousker c'hwec'h pa vezer war-nes mont da gantreal dre ar bed. Evelato, d'ar merc'her 9, da c'hwec'h eur, emomp war-sav, va breur -kaer ha me, evit tizhout porzh-houarn Kemper. Da seizh eur tregont e loc'h an tren davet Pariz. Ar vro a-bezh a zo soubet en ul latarenn wenn. Courvezet eo c'hoazh ar saout er Praderier. Houidi gwenn a neuñv war lenn Rozporden.

Ne skuizher ket o sellout dre ar prenestr, ken liesseurt maz eo ar gwelvaoù. Dizale e trec'ho boull aour an heol war ar vorenn, hag hi c'hoazh o vougañ ar bannoù. Da eizh eur e tremener e-biou da gloc'hdi pounner Kemperle.

Ur vamm gant he faotr hag he faotrez a red da glask prevezioù na vo riskl ebet da risklañ diouto er-maez eus an tren. Kaer en deus an tad klask dinec'hiñ e vab ne ra hemañ nemet pennfolliñ... Em c'hichen, daou gozhig, den ha maouez, a ziskenn bravik ganto o zamm bara, war-bouez lonkañ ur banne gwin a stag penn ouzh ar voutailh, un taol trompilh, a lavare va zad eus an doare-se da evañ.

A c'horre laez ar pont war ar Blavezh e verzer pegen brein eo an dour, warnañ un dienn hudur. An Oriant-Henbont. Mouezh ur paotr yaouank a sav eus ur c'hombod :

- Er c'hazarn em eus desket butuniñ...
- A, ya," eme egile, "eno em eus "losket"..."

Na vil al labouradegoù ! Perak ne vefe ket brav, paneve kaer, nevedoù al labour pemdeziek ? An Alre, Gwened, da nav eur, Kestemberzh. Echu diwar vremañ ar c'hloc'hdiou greunvaen : ur vegenn nemetken, warni ur gwiskad mein-sklent. 9 eur tregont, Redon. Nag a zremmoù damwelet, prim ankounac'haet ! Salv ma c'hallimp un deiz anavezout ha karout an holl dud e-barzh an Aotrou Doue !

Pegen ker boued ha braoued e diabarzh an tren : bara/silzig-ruz = 3 lur, dour = 3 lur, bier = 3 lur, soda = 3 lur. Ur vaouez noazh ledet war ur gwel gwele, daouarn oc'h ober allazig d'he divrec'h, gant al lavarenn-mañ : "Un nozvezh en ur c'hombod-gwele." Ar marc'h-Du e unan en deus ezhomm eus bruderezh gadal !

Laval : 11 eur 5. Le Mans : kreisteiz ha dek. Glas pep tra, leton dreist-holl. Bouloù amañ hag a-hont, mar ne fazian ket ez int avaloù-sukrin. Savadurioù an atantoù a gavan kalz disteroc'h eget e Breizh. Kouanez e pep lec'h eo ar vrikenn ruz. Un eur hent diouzh Pariz e krog plaennoù ec'hon gant, du-mañ du-hont, evel inizi, brouskadoù stank. Da 13 eur ugent, Trappes, Petit-Clamart, Versailles... Merket eo gant skritelloù

bras emañ aze, 400 metrad, 150 diouzh an hent-houarn, Kastell ar Roue-Heol ha n'ec bet morse nemet ur Roue-Bouev evit ar Vrezhoned.

An taksi am c'has davet turumell Menez-ar-Verzherion ("Montmartre"), dres d'an 9 a viz Here, gouel Sant-Denez, ar c'hristen a ziazezas ar gedhinienn gristen gentañ war ribl ar Ster Sena. Va blenier a anzav ouzhin penaos e tec'hfe ar c'hentañ ar gwellañ diouzh Pariz m'en defe tro da ziskoachañ un tamm labour all, kalz disteroc'h zoken, en e vro, du-se, war harzoù Breizh, stok ouzh Menez-Mikael. Un ifern eo deuet Pariz da vezañ o vezañ ma fell da bep hini kaout e dankarr dezhañ e unan. Hervezañ ez eo ret labourat unnek eur bemdez da c'hallout en em dennañ bravik, rak evel-tireoul nemetken ez a gantañ 50 lur bemdez-Doue.

Eus prenestr ar gambrig e-lec'h e tremen in an noz, toennoù ha toennoù betek an dremmwel. Eus derezioù penniliz ar Galon-Sakr, darre toennoù ha toennoù, ken pell ha ma c'hall mont ar sell. Unan eus brasañ gwalinier ar bed a hiziv eo ar braskêrioù : an den graet ur verienenn anezhañ.

Ar wech kentañ eo din pignat e-barzh metro Pariz. Lavarout a ran "hini Pariz" rak e 1966 e oan bet azezet e hini Buenos-Aires, en Arc'hantina. Gras din bezañ blenier gant ul leanez a lakaas ar bilhed em dorn da silañ en un toullig, o tont er-maez eus un toullig all hag o tigeriñ dirazon skin ur rod-kloued. Hag e c'hallit neuze diskenn dindan douar. Aze e tro un naer houarn, o lonkañ hag o tisonkañ tud, diehan. Tud dilavar. Tud dizanv.

Da serr-noz eta e savin war grec'henn "Montmartre". En daou du d'ar straedoù n'eus nemet ostalirioù ha staligoù, o tiskouez taolennoù. Livadurioù ivez war leurgêrig iliz kozh ar grec'henn. Feiz, ne glever ket kalz a c'hallig war ar blasennig-se. Paotred yaouank, barvek, hirtvevek, plac'hed yaouank a zo aze, o tivizout kenetrezo, o werzhañ o oberennoù, o livañ, o tresañ war ar prim an dremenidi a fell dezho : a-walc'h azezañ dirazo



ur pennad mat, chom difiñv ha paeañ ar poltred peurechu. War blankennoù ar chanter, evit kempenn dismantrou ar bombezennoù stlapet ouzh ar penniliz nevez zo ez eo roget ha diframmet an holl skritelloù o c'houlenn dieb-idigezh eskob gresian Yerousalem, Capucci. perak ?

Koaniañ a reer gant ar beleg 'Fidei Donum' Charles Antoine, arbennigour war Vrazil, nevez savet ul levr gantañ diwar-benn strivoù an Iliz er vroad-se. Ur beleg all, dezhañ un toullad mat a vloavezhioù en Arc'hantina, a gomz eus Peron hag eus Izabelita. Anat eo n'en deus ket kalz a joa outo. Kontañ a ra penaos ez ae a-wechoù trede gwreg Peron d'en em ziduiñ da unan eus boestoù-nnoz Madrid hag e ranke he gwaz kas unan eus e vignoned d'he c'herc'hat da zont d'ar gêr. Ur wech ne fellas ket dezhi plegañ d'hec'h ozhac'h ken e voe ret distagañ ganti flac'hadoù. Goulenn a reas avat digant he fried mirout ouzh ar floc'hig-se, re sentus, a bignat gant skeul ar c'hargoù. Ar beleg-se a anaveze ivez an hini a oferenne bep sul dirak Peron hag Izabelita. Aotre ebet da vezañ un dever-gouloù, prezegenn ebet morse ha pep tra distaliet dindan ugent munud. Yann Peron a zo ivez an den-se a zegemeras ur mor a arc'hant evit bezañ bet sinet 6.000 aotre-tremen faoz bennak evit reiñ tu d'ur bern naziourion da gaout repu en Arc'hantina. Ur sabatur eo merzout penaos gwashañ enebourion Peron a chom kilhet gantañ.

Da c'hwec'h eur on darev evit tizhout Orly. Skrivet e oa bet din em boa ar gwir da sammañ 30 kiload a bouez ha setu ma ne fell da implijadez al "Lufthansa" merkañ war va bilhed nemet 20. Ret eo tabutal un tammig. Ar pellgomz a ya en-dro. War-rackatav : gwelet e vo. Pep tra eta war an douger-sammoù pederrodek. Lezel a reer ganeoc'h ar pezh a c'hallit dougen ouzh an dorn. gant ma ne vefe ket re bounner evelato. Da bep unan e roer ur baferenn wer, warni niverenn an azezenn. Pep hini a glask e gornig. Un tad a erru gant e vabig hag e fell dezhañ e gaout en e gichen. Setu ma c'houlenn diganin dilojañ. Dre ret e kred unan eus an ostizezed lavarout din ur ger bennak e galleg evit en em zigareziañ

Ur mell labous houarn eo ur "Boeing 707" Gant daou gombod, unan kentañ klas, ugent azezenn ennañ, hag an hini eil klas gant dek-ha-pevar-ugent en un tu ha kement-all en tu all. A-us da bep treizhad ur goulaouig, un toullig-aer, un douchenn evit gervel an ostizez - rak teir a zo d'o heul - , ur mestr-ostel. Soñjal a ra deoc'h bezañ e korf ur pesk ramzel e gostezennoù toullet gant ur steudad lagadigoù-tan. Dirazoc'h, e pep tu, en em astenn teir renkennad azezennoù don ha, du-se, ur speurenn, ur ouel en he c'hreiz evit disrannañ ar c'hentañ klas diouzh an eil. Em c'hichen div amerikanez kozh a soñjo dezho ec'h ouzou saozneg daoust ma n'eus grik ebet ganin er yezh-se : mousc'hoarzhin a ran hepken eus va seizh gwellañ.

Diouzhtu kerkent ha dibradet, ha se bep gwech, e vez displeget d'an dreizhidi, penaos analañ oksigen, penaos ober gant ar chupenn salviñ, mar errufe ur gwalldaol bennak. Diouzhtu ivez e stager da ober war-dro ho kof. Un daolig a zo dirak pep hini, a c'hallit pegañ ha dispegañ diouzh kein an azezenn diaraog. Dre drepas strizh ar c'hreiz e teu hag ez a eus an eil penn d'egile ur garrigellig o tougen meuzioù hag evajoù. Un tamm digor-kalon, da gentañ. ur sac'hadig pistachennoù-douar, hag ur werennad bier pe sug-frouezh pe win pe zour... h.a.

(Da genderc'hel)

=====

EURUTELLEREZH

Embann a reomp amañ da heul ul lizher kaset d'hor c'henlabourer Y.-D. Olier e sigur ar pennad bet savet gantañ diwar-benn STIRNER ha bet moulet er gelaouenn-mañ.

"Lennet em eus gant aked bras da bennad dek pajenn war niverenn 57 IMBOURO'H. Penn-da-benn da skrid e tiskouezez e kredez en Doue Bev enep da bep huddelwenn, pezh a zo mat. War hed ar seizh pajenn gantañ eta ne gav-an netra da damall d'az mennozioù, zoken pa grogez endev da lavarout e dibenn al lodenn gantañ rakveneget (p.308) ne oa Breizh evit tud an Emsav kozh nemet ur "c'heal", elese un "huddelwenn", ur "gravez". Mat. N'on ket ali ganit avat adalek ma krogez da embann ned eo ken Breizh netra, war-bouez klask dedalvezout da'z Feiz en Doue Bev ar pezh a gavez mat en mennozioù Stirner, nag adalek ma teu ganit an dastumenn : n'em eus ken netra d'ober nemet 'mont da vanac'h' (p.310) 'en ur chom Breizhad'koulskoude (p.312) 'rak ret mat eo bezañ un dra bennak'...

Adalek seurt arroudoù em eus gwelet mat ar pezh a rae diouer dit : e gwirionez, evel an darn-vuiañ eus ar feizidi gatolik (pe get) ez out douead hep bezañ kristen. Kalz kristenion gatolik a zo degouezhet bremañ er par m'emaout. Nann, n'eus anezho nemet doueaded, ha se dre wall ar gelennadurezh a zo bet roet dezho gant ar gloer gozh, dre wall ar speredegezh a zo bet plantet en atil ar gristeniezh katolik abaoe pell amzer. Evit ac'hano e kavan iskis kenañ seurt saviad rak kaer he deus bet an Iliz katolik kozh kelenn d'an dud nemet danvez al Lezenn Nevez (arabat e oa, evel ouzout, komz diwar-benn al Lezenn Gozh, elese an Testamant Kozh, pezh a oa protestant, emezo!) ac'hanta n'eus bet tizhet nemet ar pal enep : ober kredourion chomet dindan al Lezenn Gozh, ober ganto doueaded hep ken all, 'kristenion' na ouzont ket petra eo Lezenn ar C'hrist Den-Doue.

Mar skrivan dit hiziv ez eo dre m'emaon o vont d'embann ul levr o tiskouez ned eo ket Breizh netra, dres dre berzh kelennadurezh al Lezenn Nevez a gaver war-bouez studiañ ha buhezañ an Aviel. Un dlead eo bezañ douead na petra, hogen un dlead ken groñs all eo bezañ kristen. Hag evit ur c'hristen n'eus ket tu da embann pezh a skriv-ez war hed teir fajenn diwezhañ da bennad war IMBOURC'H **rak enebek eo seurt arguzennoù**ouzh Lezenn Nevez Jezuz-Krist ouzh ar vuhez bet renet gantañ (hag ur vuhez E hini na oa ket evit ober van!), ur vuhez enta heñvel ouzh hon hini adalek an deroù betek an diwezh. Ha mard eus kristenion, reoù wirion ha diles, a vez o tibab mont da vanac'h, gouez dit, ned eo ket evit bezañ troc'het diouzh an 'netra' maz eo an douar, kentoc'h avat evit bezañ sebeliet en e greiz ha, dre seurt aberzh, gouestlañ gwelloc'h o buhez da silvidigezh ar bed. Klask bezañ manac'h gant mennozioù all a vefe klask emgerc'h (emgarantez fall), chom disablant ouzh e vreudeur enep da c'hourc'hemenn ar C'hrist hag Eñ, dres, Komz Nevez an Doue Bev.

Studi ervat Jezuz-Krist. Diarvar on e teui neuze da welout emamp bremañ hag e vezimp betek fin ar bed dindan al Lezenn Nevez a zo ivez ar Sklerijenn Nevez : Lezenn an Den-Doue, Hon Salver, Penn ar Grouadelezh, Penn an Dassoerc'h hollek, traoù ha Tud. Ul Lezenn a rafenn kentoc' anezhi ur 'saveleñn' Drabedel e gwirionez ma c'haller, bennozh dezhi, diskoulmañ hiziv c'hoazh kement kudenn hanvoudel a sav dirazomp, zoken war dachenn Vreizh. Hag aes eo kompren se rak Doue o tont dre garantez evidomp da gemer warnañ hinienn ha hanvoud an den, elese hinienn ha hanvoud KEMENT SEURT DEN a vevo hiziviken war an douar ne c'halle ket tremen hep lezel ganimp, adalek donedigezh E GOMZ EMGREUDET en hon touez, ur respont salvus evit hiziv hag arc'hoazh da gement diaester a gavomp war hon hent : CHRISTUS HERI ET HODIE, gouez da lidadurezh Pask. Ya, emañ Hon Salver ouzh hon c'helenn hiziv c'hoazh, ha bez e vo bet ma tistroy. Hogen, dimp da verzhout emañ bepred ganimp, e tleomp akediñ outañ, studiañ E gomzoù hag ouzhpenn teurel evezh ouzh pezh a lavar ivez dre hanterouriezh ar SPERED GLAN, ma c'allimp kavout pep ateb ha pep diskoulm amañ ha bremañ d'hon atersioù hanvoudel.

Evel breur kristen ha brezhon emañ diouzh va dlead kristen klask reiñ un ateb d'ar goulennoù pennañ a vez o vresañ da spered ha da galon. Ha moarvat ar garm krisañ a oas rediet da leuskel e korf da skrid, dre maz out leal ha kempoell gant da gredenn, eo hemañ : "Breizh a dremeno" ha "Breizh n'eo netra ..." Kompren a ran da gasoni ouzh ur seurt bed ha da c'hlac'har evel douead nannkristen pe - da gomz dirustoc'h - (rak re rust on marteze ganit), evel Douead nann sklerijennet war e gristeniezh. Disoc'hañ a rez gant ar gerioù : "Goude ar Bibl an Divibl". Spontet on e gwirionez rak da vihl koulz ha da zivibl zo kealioù diglok mantrus. Va meno din, goude lenn seurt traoù, zo kentoc'h : goude bibl diglok an doueadegezh NEMETI, divibl ken diglok all an azenerezh digristen. Rust on c'hoazh evidout ha gra diouzh va digareziñ rak en abeg da'm gred evit Komz wirion Doue an hini eo. Ar respont a c'hallan reiñ dit a gavi em levr "EN DOIVOR DA VREIZH". Lenn dreist-holl ar pajennoù a bled gant ar gudenn-mañ. Kavout a ri tu bennak ur frazenn evel houmañ o tennañ da gudenn Vreizh ha d'he Dazoned : "O vezañ maz eo enstag dasorc'h an den ouzh hini ar C'hrist, Penn ar Grouadelezh, n'O DEUS MUI AR POBLOU SUJ AR GWIR DA LEZEL O C'HENELELEZH DA STEUZIAN PE DA WARIAN, evel ma raent kent donedigezh ha dasorc'h an Den-Doue, Jezuz-Krist. Salvat eo ar grouadelezh en he fezh, dasorc'het eo Krist an Tudadoù..." Seurt silvidigezh n'eo ket silvidigezh an 'ene' emren hepken, an ene denel sellet evel ur solwez distag, evel maz anad diwar da skrid re alies (pezh a zo karteziat rik, soñj ervat), n'eo ket ken-nebeut silvidigezh ar feiziad digenvez o krediñ en un Doue digomprenadus na silvidigezh "daonidi an douar" hogen silvidigezh an den gant E GORF, e hêrezh, e hiniennelezh, e 'gedhiniennelezh', e genelelezh, e genel-vroadenn, en ur ger silvidigezh vleuniekaus an Dazoned kristen, e Paradoz an Dreinded, silvidigezh AN DEN KLOK HA KEFLEUN, kemennet gant Jezuz-Krist, Salver ar Grouadelezh.

Gant tro ar gevredigezh ez eo deuet an deologourion gristen da veizañ gwelloc'h ar c'hudennoù kristen stag ouzh ar gevarzhelouriezh ha bremañ ez embannont kalz skridoù diwar-benn ment "kevarzhelour" elese denelklok, ar silvidigezh e par Jezuz-Krist. Kavout a reer ganto levrioù talbennet "Teologiezh an Dispac'h", "Teologiezh an Dieubidigezh" ha me 'oar. Mat... gant diorreadur ar gweri ekaat e tenn bremañ seurt levrioù, evel reizh, da wellaat teologiezh an Enkorfadur, an EMGREUDADUR. Hogen ne welont ket c'hoazh e rankint anavezadenniñ donoc'h himiennelezh hag hevelebiezh an den evit ma splanno holl wirionez an emgreudadur kristen. Setu perak em eus klasket em levr herouezañ ur gelennadurezh teologel resisoc'h diwar-benn an tudadoù, o vezañ maz eo disheñvel o dezvad trabedel abaoe Dasorc'h ar C'hrist, un darvoud na soñjer ket ennañ en abeg da wariadur ar politikerezh."

P.E.

=====

L I Z H I R I

Keneil ker,

Goude lenn ho pennad "SKRITUR HA POLITIKEREZH", ur frazenn dicutañ zo chomet e'm spered : "chom hep farsal re en un afer a zleje bezañ sirius". Re wir eo e vefe poent bras ehanañ da c'hoariellañ ha da joueal gant gerioù ha mennoziou a beb seurt, kontrol alies an eil d'egile, evit gwelout sklaer pezh a zo, ha pa lavaran 'pezh' e soñjan "an dud, o labour, o nerzh".

Peogwir on bet e-touesk ar re gentañ eus kostez ar "peurunvan", o kemer perzh er bodadegou-se e ouzon a-walc'h n'int ket bet biskoazh un digarez da ober fent, da "skrapañ" den ebed dre heg, nag ivez da greskiñ "poan spered ur c'helenner kaezh", ha diskleriañ a ran n'eo ket sirius embann an dra-se. Ouzhpenn hennezh a vez boemet a-wechoù ivez...

"Sirius", "poelleg", setu aze a-benn ar fin, war-bouez petra ' zispenner al labour evit unvaniñ ar yezh skrivet, boulc'het pevar bloaz zo, ' gav din, ha kaset war-raog ingal abaoe, o vont e-biou da skoilhoù a beb seurt. Nann, setu rak evel ouzoc'h, ar stourm evit ar yezh ("pobleg") n'eo ket poelleg. "Ar strivoù e sell da dostaat ar yezh lennek ouzh ar rannyezh-mañ-rannyezh' a vo atav tidel a-grenn ha ne zisoc'hint nemet da vruzhunañ ha da c'hallekaat ar yezh lennek..." Pezh a vefe da hentiñ, kentoc'h, a vefe "ur c'helennerezh brezhonek unyezh". Ya, laouen, oc'h ober moarvat heb ar gelennerien vrezhoneg (dindan ar gouarnamant pe izili an emsaviou sevenadurel) a zo kazi holl hiziv o klask unvaniñ ar skritur... Poelleg eo 'michañs ober "promesaou a seurt-se" ! Ne gredan ket e ve poelleg nag emsaw derc'hel d'ur seurt pesketaerezh loar, o tispakañ huñvrecu a-benn kcachañ ar pezh a zo. Goude-se 'ta ' teuer da gontañ deomp an dañjer zo o lezel "tid pep skrivagner da c'hoari" !

Daw eo bezañ fur ! "Difur" vefe cheñch skritur d'ar brezhoneg. Furoc'h eo kaoud daou skritur, moarvat... Pa welan me strolladou evel S.A.E., ar FALZ, al LEUR NEVEZ, kelaouennou evel POBL VREIZH, E.A.B., ha n'ouzon dare ped all c'hoazh prest da heuliañ, pa welan anezho o'n em glevout ouzhpenn war dachenn ar stourm hag an oberiantiz sevenadurel, kaer 'm bez difoupañ ma daoulagad, selloud hag selloud, ne dapan gweloud a-hend-all nemet ur voza "ekstremisted" pennfollet, pe tud mod kozh, re gozh, re reud evit galloud cheñch, peotramant un orin bennaked amañ pe ahont. Braw eo boud fur, gwelloc'h boud bew. Trawalc'h furentez tud marw hon istor !

Nann, n'eo ket fur ne weler emsav ebet o tiwanañ abace un toullad bloavezhioù. N'eo ket fur a-walc'h, se. Peda vare neuze zo bet un "emsav"? N'eo ket sirius disklipañ kaoziou e-giz : "N'eus ket mui tu ebet d'en em harpañ da vat war an teodyezhoù lec'hel a zrailhont c'hoazh hiziv..." (ar vugale hag o zud peuz yaouank, ba'r "Breizh Izel" daonet-se!) Gouñd 'ouzon "ce n'est pas le biniou qui remplacera la grande musique..."

Furoc'h e vefe, sur mad, dont da weloud pe, marteze, goulenn digant ur c'helenner... Met peogwir emaint holl "rannyezhelour ha rannvroelour" moarvat eo kenkoulz tremen hebte ! A-boan pellaet spontailh al "ledemsaverion"-se, setu neuze e vezer spouret gant giz ar gerioù "trefoet"... Bewech moarvat e lenner "promesaou" hag "ispisial" Imbourc'h, ' groger da skrijañ ! Nann, ne gredan ket eo gwall fur a-berzh ar skrivagner lakad e lennerien da hirisiañ giz-se, ha marteze da lonkañ traoù ken gleukes.

Ha perag ivez, pa vez kont eus ar "rummad yaouank" derc'hel da zispenn ar pezh a reont, da chikanañ anezho (o brezhoneg, o blew marteze...) , anez tremen d'ur paour kaezh kozh. Ha ma n'eo ket "poelleg" na talvoudus ar pezh areont, petra a soñjer eus ar pezh a ginniger deomp : an tiegezh, an Iliz (paneve ar "vroad", eveljust). Ne vezer ket gwall bell diouzh "Feiz ha Breiz" kozh, 'm eus aon. Ur bazenn muioc'hig war-dreñv, ha mad pell zo !

Kement-se evid diskouez n'eo ket "sirius" d'am meno, hag e c'hall bezañ dañjerus savboent Imbourc'h. Forzhig traou all zo ivez ha n'hallan ket bezañ a-du gante. Re hir e vefe displegañ anezho amañ. Lavaroud a rin hebken ne gredan ket e vije POBL VREIZH un eil KROAZ AR VRETONED, o klask pourchas "skridou da lenn d'ar vrezhonegerien diwar ar maez" ("gant ar stourmerion-se ez eo miret ar brezhoneg da gouerion Breizh-Izel ha ha n'eus ket anv a ober anezhi yezh ur vroad a vefe da adsevel..." ouzoc'h a-walc'h) Piw a ra fent gant an dud, eus kêr pe diwar ar maez, o tiskleriañ traou ken bleup ?

Anzaw a rin koulskoude e vez diskouezet sklaer a-walc'h an nerzh, pe al lañs zo gant an U.D.B. en taol-mañ, ha goude ma n'on ket memes tu gant ar skrivagner evid gouzout hag-eñ "ema ar wirionez hag ar galloud gant ar yoc'h (daw vije termeniñ ar yoc'h-se rak n'ouzon ket gwall gaer peseurt spontailh, peseurt "yod kaoc'h" a lak tud zo dindan ar ger-se!) na c'haller ober netra hebtañ hag ema gantañ al hwez an Istor, " ' gav din en deus gwelet bepred peseurt c'hoari politikel zo aze : pouez an U.D.B. hag ar strolladou peuz tost dezhi. Pouez krec'h pe pouez traoñ ? Rener IMBOURC'H n'houl ket dont da heul, ha goulenn a ra digant e lennerien ober kemendall. Fae eo ganin evelkent gwelout anezhañ o skopañ ken seder war baotred al luskad nevez, o klask tremen ar re all da "ledemsaverion", "tremendelour", "hengounelour", "mirourelour" ha me oar-me c'hoazh ! Ma 'n deus pep hini an urzh da lavaroud e soñj n'eo ket dleet dezhañ evid se goleiñ ar wirionez gant kouilhourenn a seurt se. Ra sello pep hini outañ e unan hag e welo, marteze...

Med goude ma n'on ket a-du tamm ebet gant pennad IMBOURC'H e ouzon a-walc'h e wel sklaer e aozer a-wechou, e ouzon ivez en deus bet dalc'hmad ur serten onestiz spered. Koulz e vije dezhañ kompren ha diskleriañ n'haller harzañ da vad ouzh al luskad nevez da unvaniñ ar skritur hag an emsav sevenadurel dre vras, anez, eveljust, e kavje gwelloc'h 'n em zispertiañ krenn diouzh al luskad-se, ha bruzhunañ un tamm muioc'h an emsav (sic) brezhoneg.

Ne gav ket din e vije emsaw evid den ebed gweloud un eil disparti etre ar skrivagnerien nag etre ar stourmerien, un disparti n'en dije sterr yac'hus ebet, setu perag ' gavan diaes gweloud Youenn Olier hag un toullad tud all moarvat turlutet ar mod-se, hag e hetan gweloud anezho divoemet an abretañ ar gwellañ. A-hend-all, penaos kompren e chomfent diseblant o weloud ar bras eus ar rummad yaouank o treiñ oc'heind dezho ? "

Da zivankañ P.17. 1.5./fougeal/  
p. 18.1.14 klenkañ : Nann, F.F. Poullaouen,  
n'eo ket fur/lavarout/neweler... 1añ a vizMeurzh

\*\*\*\*\*

ADDISPLEG

Embannet hon eus al lizher-mañ e-giz m'emañ netra nemet evit reiñ un tañva eus ar skritur "nevez". Moarvat, an doare-mañ eus ar skritur "nevez" n'eo ket gwall zisheñvel diouzh ar peurunvan kozh (notit evelkent e kemmer ivez reolennoù ar yezhadur, tro pe dro) ken e c'heller en em c'houlenñ ha talvezout a rae ar bean kemm

Ar pezh a zo da zoujañ avat eo na ve ket a-walc'h ar c'hemm-mañ d'ar re o deus divizet a-benn ar fin terriñ hengoun ar "peurunvan" hag hini al LIAMM bet e penn hor buhez lennegel betek ar bloavezhioù diwezhañ.

Ne gav ket din, a-hend-all, e tizh ar respont-mañ dalc'h ar gudenn. Ne roer respont ebet diwar-benn niver ar vugale desavet hiziv e brezhoneg war ar maez (ataw politikerezh ar struskañval e benn en traezh) na diwar-benn kudenn ur c'helennerzh sirius eus ar yezh en holl zerezhioù ar reizhiad-kelenn a vremañ. Ret eo lavarout ne ra ar skritur nevez nemet luziañ ar gudenn peogwir e tisoc'h intrudu berrboell hag aheurtreth lorc'hus stourmerion zo nemet da grouiñ - da nebeutañ - teir skritur e-lec'h div ha da bourchas un digarez ouzhpenn da vistri an deskadurezh e Breizh evit nac'hañ o goulenñ ouzh ar re a garfe ledañ kelennadur hor yezh er skolioù.

Rak setu dres an dalc'h : distailet o deus paotred ar skolveurieg kozh ar c'hinnig unvaniñ a zo bet graet dezho. N'eus nemet lenn niverenn diwezhañ "Breiz" adarre evit merzout ez eo graet o soñj ganto war ar poent-se (1). A-hend-all, darn eus ar re o deus degemeret ar skritur nevez a nac'h ober gant ar "zh" (o lakaat an "h" etre krommennoù h.a.) Ha me ' garfe ivez gwelout ar "mode d'emploi" evit ar wenedourion a garfe c'hoazh skrivañ en o rannyezh. An unvanerion n'int ket zoken evit en em glevout da vat kenetrezo.

Evit ar peurrest e klaskin respont berr-ha-berr. Degemer ar sokialcuriezh a c'heller ; kement-se avat ne dalv ket e ranker degemer evit kelou-se prederouriezh (goude ma vije diembann) ar re a zo o prientiñ ur sokialouriezh zo, an hini, peurgent, a zo diazezet war an "danvezelouriezh istorel". N'eus ket da enebiñ ouzh ar sokialouriezh evel reizhiad armerzhel-politikel hogen n'eus ket da skoazellañ ar re a zo mennet da grouiñ ur sevenadur hag a zo enebet ouzh ar Feiz kristen, lakaet e vijed kristen, da skouer. Rak-se e nac'han-me harpañ nep aozadur ha na glotte ket penn-da-benn gant va c'hredenn. zoken war dachenn ar "c'hultur".

War zaou boent all e klaskin silgeriañ a-hend-all:

1) N'on ket enebet ouzh ar re yaouank dre maz int yaouank. An tamall "gouennelcur"-se a gavan direizh a-grem (lavarout a ran ez eo "gouennelcur" an tamall-se peogwir, dres, e vez graet gant re "yaouank" d'ar re a zo koshoc'h egeto bewech na harpont ket o zezemnoù-int). Perak e rankfed bezañ a-du gant ar "re yaouank" war zigarez ez int yaouank, e-giz pa vije ar wirionez ganto dre ret ? (Evit pegeit int "yaouank" a-hend-all ? Petra en deus un den tregont vloaz, dimezet ha bugale dezhañ da welout gant ur paotr yaouank triwech vloaz nevez echu e studi eil derez gantañ?) E 1945 ez on-me en em gavet dres er memes degouezh hag hiziv ha me enebet ar wech-se ouzh ar

(1) Ar skeudenn-lu a rae dave da emzivizoù Paris etre Vietcong ha Suvietnam a ziskouez mat ne oa fiziañ ebet etre ar re a gemere perzh en emzivizoù-se.

ouzh ar rummad koshoc'h egedon hag o nac'hañ ivez  
kemm ar skritur (ar memes hini a-hend-all). Kozh pe  
yaouank, an holl a zo gwazed atebek hag evel gwazed  
atebek e ranker ober outo, ha n'eo ket evel babigoù  
e ve arabat reiñ an disterañ poan-spered dezho.

Evit ar blev hir ne heuliañ ket ar c'hiz, gwir eo -  
spi am eus ne vo ket tamallet din adarre - hogen n'eo  
ket me a yelo da damall d'hor brogarourion yaouank  
bezañ diskibion BRIZIUG a veulgane gwechall "la Race aux  
cheveux longs..."

2) War var en em gavfen da vezañ digenvezet ma nac'hfen  
degemer ar skritur nevez. An dalc'h evit un den onest n'eo  
ket bezañ digenvezet pe get hogen bezañ feal d'ar pezh  
a sell evel ar wirionez. Hag amañ dres e par daelerezh  
hor sofisted nevez ; goulenn a reer digant unan heuliañ  
ar Strollad war zigarez e tifenn ur c'hraf ma rank an  
holl bezañ a-du diwar e benn, en degouezh-mañ ur skritur  
hepken evit ar brezhoneg. Hogen evit difenn ar poent-se  
e ranker degemer penn-da-benn politikerezh ha sellboentoù  
ar Strollad, da lavarout eo koll penn-da-benn frankiz  
soñjal hag oberiañ.

Maz eus un disrann hiziv, piv a zo kiriek ? Ar ré o  
deus divizet kemm hep kaout abeg mat ebet d'henn ober,  
netra nemet evit devoudañ un "daelerezh" a-du gant o  
folitikerezh, pe ar re a nac'h dont tre en daelerezh-se  
evit menel feal d'ar c'hredenn-int ?

Hogen daoust ha ret eo e ve un disrann ? Eus va ferzh-me,  
foerzh penaos, ne vo ket ; n'on ket fanatik a-walc'h evit  
krediñ e ranker troc'hañ pep darempred en emsav gant ar  
re n'int ket ali ganeomp war beppent eus ar stourm a zo  
da ren hiziv e Breizh. Ar fanatikouriezh-se eo a gavan  
glac'harus en trede emsav abaoe un dek vloaz bennak.

Y.O.

+++++

RAKLAVAR (1)

Kinnig a reer ar roll eus ar c'humunioù e Breizh  
a vo kavet er c'haier-mañ evel un digoradur d'ur rummad  
skridoù o tennañ da stad ar boblañs hag an armerzh en hor bro.  
Un diell a boblañsouriezh hag a zouaroniezh ez eo eta evit  
darn.

Estreget se ez eo avat. E-tal doare gallek  
kefridiel an anvioù kumun ez eus bet moulet an doare brezhonek  
a vo implijet diwar-vremañ el labourioù o plediñ gant douar-  
niezh ha poblañsouriezh Vreizh embannet, pergen, gant Imbourc'h,  
hag aliañ a reomp start kement hini a zo e chal gant advrezho-  
nekadur ar vro da ober ganto. D'ar mare ma soñjer e Breizh  
evel e Kembre reiñ d'hor bourc'hioù ha d'hor c'hêrioù, stummoù  
brezhonek reizh o anvioù ez eo mat pourchas d'ar foran patrom  
an doareoù brezhonek kefridiel a c'hellint degemer. Henezh a  
vo un tu da zegas ar yezh e mererezh ar c'hehenterezh. Un tu  
e vo ivez d'an emsaverien da zegas ar yezh e mererezh ar post  
dre enskrivañ war al lizhiri ar chomlec'hioù e brezhoneg. O  
vezañ m'eo niverennet ar burevioù-post diwar vremañ e c'hell  
unan kas e lizhiri gant ar chomlec'h penn-da-benn e brezhoneg.  
Moarvat e vo dister bepred ar pouez eus seurt pleustrezhioù  
evit ar poent ha ne vo ket bras kennebeut ar frouezh anezho.  
Hogen o boulc'haf a ranker adal bremañ, dres bepred a-benn  
boazañ ar foran outo hag aesaat warc'hoazh ur politikerezh  
advrezhonekaat a rank bezañ kaset war-raok gant ar renad  
brezhon.

Diwar-benn doareoù brezhonek an anvioù-lec'h e  
c'hellomp reiñ an diskleriadurioù-mañ. Evit reter ar vro bet  
gallekaet abaoe un nebeut kantvedoù hon eus graet hor mad  
eus labour Théophile JEUSSET a zo bet savet da vare ar brezel  
hag embannet goude. Gant aked eo bet graet al labour-mañ ha  
dre vras n'hon eus ket degaset kalz kemm ennañ nemet eeunaat

(1) Ar raskrid-mañ a oa bet savet daou vloaz zo evit ul  
levrig a vije bet gouestlet d'an anvioù-lec'h kefridiel e Breizh.

pe unvanaat stummoù zo. Ne gredomp ket e talv ar boan, da skouer, distreñ d'ur stumm "Gwennvenez" evit "Gemene-Penfav" o vezañ ma kaver ar stumm-se - "Gemene" - a zo kozh dija, e meur a lec'h e kurnog ar vro. Klasket ez eus bet ivez degas un tamm kempoell en implij ar rakger "plou-". Moarvat e c'heller kavout abeg e stumm pe stumm kinniget gant Théophile JEUSSET a zo re bell a-wechoù diouzh ar stummoù kefridiel gall (ha kement-se a zo c'hoarvezet a-wechoù daoust d'al labour skiantel kaset da benn, gant an oberour). Hogen kemm ar stummoù-se en dije goulennet un enklask pizh ha n'hor bos ket amzer da gas da benn; dre se e vije bet tidel kement kemm hor bije degaset er stummoù kinniget gant Théophile JEUSSET. Moarvat n'hon eus ket gallet tec'hout penn-da-benn diouzh an didelezh dreist-holl er stummoù bet ijinet amañ evit talvezout doareoù gallek ha na oant ket bet troet gant Théophile JEUSSET end-eeun. En degouezh-se omp bet mennet hepken da reiñ ur stumm brezhonek gwirheñvel a-walc'h o treñf anezho diwar ar galleg diouzh ret (ne oa ket tu d'ober e giz all e meur a bastell-vro e reter ar vro). Moarvat e c'hello al labour-se bezañ reizhet ha gwellaet a c'houdevezh maz eus ezhomm, ur wech ma vo bet tu da gas da benn furchadennoù zo. Hogen kounañ a rankomp amañ n'eo ket ur mennad, n'eus forzh penaos, kas da benn al labour skiantel, unan politikel ne lavaromp ket, ha n'he deus ket pal an oberenn-mañ nemet reiñ un dremm vrezhonek da zouaroniezh hor bro.

Evit kornog ar vro e oa diaesoc'h hag aesoc'h war un dro an droiell a oa da ren. Diaesoc'h e oa dre ma ne oa bet nemet un nebeut furcherien ha gouizieien o pleustrif war an dachenn-se (gw. labourioù an Ao.Ao. KLERG, FALC'HUN, ar MENN, h.a...), ha dislavaroù alies kenetrezo. Aesoc'h e oa avat dre maz eo brezhonek an holl anvioù-lec'h kefridiel a zo arveret dindan ur stumm trefoet en ur c'horn-bro benn "Kemper", da skouer, a zo distaget "Kepar" e Kerne-Izel. Anavezet eo "Ploubazlaneg" e korn-bro Pempoull, da skouer, dindan ar stumm "Pleraneg", "Banaleg" dindan ar stumm "Banleg" e Kerne-Uhel, "Pontivi" dindan ar stumm "Pofdi" e Gwened-Uhel "Gomenec'h" dindan ar stumm "Gouesnac'h" e Treger, h.a...

Daoust ha ret e oa degemer ar stumm kefridiel hengounel pe ar stumm trefoet ? Kredet hon eus e oa gwell e degouezh ur vourc'h bennak ha n'oa anavezet an anv anezhi nemet en un taolead enk a-walc'h a-wechoù, en em harpañ kent-oc'h war ar stumm kefridiel, gant ma vije reizh ar stumm, o tiwall avat da reiñ un doare arnevez dezhañ. Ne vije ket bet fur, lakaomp, da zegemer "Pleraneg" ha n'eo anavezet nemet e taolead Pempoull; n'eo ket dav kennebeut all avat implijout ar stumm kefridiel a zo brezhonek-krenn. E seurt degouezhioù eta hon eus divizet reiñ d'an anv-lec'h ar stumm en dije gwisket e brezhoneg lennek en ur verkañ diouzh ret ar c'hennadurioù, ha ne oant ket aroueziet er grennamzer, d'ar mare ma voe diazezet stummoù kefridiel an anvioù-lec'h (1).

Kavet hon eus gwell ivez mirout ur stumm evel "Gomenec'h" e-lec'h "Gouesnac'h" a gaver a-hend-all evel stumm kefridiel e-tal an Oded, evit diforc'hañ dres an daou anv-lec'h hag ivez a-benn tostaat "Gomenec'h" ouzh anvioù-lec'h all heñvel pe damheñvel outañ : "Gomene e-tal Merinie", "Gemene-Porc'hoet", "Gemene-Penfav"... N'hon eus ket klasket avat ad-sevel stummoù kozh evel da skouer "Runmaengol" e-lec'h "Rumen-gol", hogen degemeret hon eus dre vras ar stummoù tostañ ouzh ar stummoù kefridiel gant ma vijent reizh.

Ar pezh a zo a bouez e Breizh-Izel eo, da gentañ, reiñ ur furn hag ur reizhskrivadur brezhonek d'an anvioù-lec'h. Klasket hon eus ivez kempoellekaat implij ar rakgerioù "Plou-" ha "Lann-" da skouer.

Hini pe hini a gavo abeg e tra pe dra el labour-mañ hag anzav a reomp e vo tu da wellaat anezhañ dre ar munud. A-hend-all, divent eo tachenn al lec'hanvadurezh e Breizh, meur a vloaz a dremeno a-barzh ma vo bet peurimbourc'het gant yezhoniourion ha furcherien. Hogen adlavarout a reomp adarre

(1) Ouzhpennomp ez eus un abeg da chom hep arverañ ar stummoù trefoet : diasur-tre eo dazont ar parlantoù brezhonek ha gwirheñvel eo e vint steuziet tost da vat a-benn dek pe ugent vloaz.



n'eo ket skiantel na folklorek ha gwerinelour hor mennad tamm ebet, broadel eo, a adlavaromp, hag ar mennad-se a zlec bezañ sklaer e spered kement hini a arvero al labour-mañ. Pezh a fell deomp tizhout eo reif ur benveg d'ar Vrezhoned da adperc'hennañ o bro o taskorif dezhi al lec'h-anvadurezh vrezhonek reizh a zleje bezañ bet miret ganti a viskoazh.

Y. O.

Bez e oa 1 522 gumun e Breizh e 1962, 1 517 e 1968 (ar roll-mañ) ha moarvat nebeutoc'h c'hoazh e 1974 gant ar c'hendeuzidigezhioù-kumun.

| Niverenn<br>I.N.S.E.E. | Anv<br>gallek           | Anv<br>brezhonek | Niver a<br>annezidi | Niverenn-<br>bost |
|------------------------|-------------------------|------------------|---------------------|-------------------|
| 22001                  | ALINEUC                 | ALINEUG          | 744                 | 22460             |
| 22002                  | ANDEL                   | ANDEL            | 517                 | 22400             |
| 22003                  | AUCALEUC                | OKALEUG          | 451                 | 22100             |
| 22004                  | BEGARD                  | BEAR             | 5 454               | 22140             |
| 22005                  | BELLE-ISLE-<br>EN-TERRE | BENAC'H          | 1 234               | 22810             |
| 22006                  | BERHET                  | BERC'HED         | 223                 | 22140             |
| 22007                  | BINIC                   | NINIG            | 2 229               | 22520             |
| 22008                  | BOBITAL                 | BOBITAL          | 408                 | 22100             |
| 22009                  | LE BODEO                | BODEOU           | 357                 | 22320             |
| 22010                  | BONEN                   | BONEN            | 726                 | 22110             |
| 22011                  | BOQUEHO                 | BOSKO            | 828                 | 22170             |
| 22012                  | LA BOUILLIE             | BEZULIA          | 597                 | 22240             |
| 22013                  | BOURBRIAC               | BOURC'H-VRIAG    | 2 978               | 22390             |
| 22014                  | BOURSEUL                | BOURSAOUT        | 1 006               | 22130             |
| 22015                  | BREHAND                 | BREHANT          | 1 307               | 22510             |
| 22016                  | ILE DE BREHAT           | BRIAD            | 653                 | 22870             |
| 22018                  | BRELIDY                 | BRELIDI          | 357                 | 22140             |
| 22019                  | BRINGOLO                | BRINGOLO         | 397                 | 22170             |
| 22020                  | BROONS                  | BRON             | 2 703               | 22250             |
| 22021                  | BRUSVILY                | BRUSVILI         | 658                 | 22100             |
| 22023                  | BULAT-PESTIVIEN         | BULAD-PESTIVIEN  | 827                 | 22160             |
| 22024                  | CALANHEL                | KALANEL          | 522                 | 22160             |
| 22025                  | CALLAC                  | KALLAG           | 3 360               | 22160             |
| 22026                  | CALORGUEN               | KALORGWEN        | 506                 | 22100             |
| 22027                  | LE CAMBOUT              | KAMBOUD          | 718                 | 22210             |
| 22028                  | CAMLEZ                  | KAMLEZ           | 665                 | 22450             |
| 22029                  | CANIHUEL                | KAHIVEL          | 653                 | 22480             |
| 22030                  | CAOUENNEC               | KAOUENNEG        | 327                 | 22300             |

|       |                     |                 |        |       |
|-------|---------------------|-----------------|--------|-------|
| 22031 | CARNOET             | KARNOED         | 1 384  | 22160 |
| 22032 | CAULNES             | KAON            | 1 828  | 22350 |
| 22033 | CAUREL              | KAOREL          | 434    | 22530 |
| 22034 | CAVAN               | KAWAN           | 844    | 22140 |
| 22035 | LES CHAMPS GERAUX   | MAEZIOU-KERAOD  | 943    | 22630 |
| 22036 | LA CHAPELLE BLANCHE | CHAPEL-WENN     | 236    | 22350 |
| 22037 | LA CHAPELLE NEUVE   | CHAPEL-NEVEZ    | 798    | 22160 |
| 22038 | CHATELAUDREN        | KASTELLAODREN   | 1 215  | 22170 |
| 22039 | LA CHEZE            | KAEZ            | 668    | 22210 |
| 22040 | COADOUT             | KOADOU          | 331    | 22200 |
| 22041 | COATASCORN          | KOATASKORN      | 281    | 22140 |
| 22042 | COATREVEN           | KOATREVEN       | 458    | 22450 |
| 22043 | COETLOGON           | KOETLOGON       | 430    | 22210 |
| 22044 | COETMIEUX           | KOEDMAEG        | 624    | 22400 |
| 22045 | COHINIAC            | KOHINIEG        | 408    | 22800 |
| 22046 | COLLINEE            | KOADLINEZ       | 619    | 22330 |
| 22047 | CORLAY              | KORLE           | 1 213  | 22320 |
| 22048 | CORSEUL             | KERSAOUT        | 1 925  | 22130 |
| 22049 | CREHEN              | KREHEN          | 1 512  | 22130 |
| 22050 | DINAN               | DINAN           | 16 605 | 22100 |
| 22051 | DOLO                | DOLOU           | 513    | 22270 |
| 22052 | DUAULT              | DUAOT           | 658    | 22160 |
| 22053 | EREAC               | ERIEG           | 921    | 22250 |
| 22054 | ERQUY               | ERKE-war-vor    | 3 061  | 22430 |
| 22055 | ETABLES             | STAOL           | 1 954  | 22680 |
| 22056 | EVRAN               | EVRANN          | 1 560  | 22630 |
| 22057 | LE FAOUE            | AR FAOUED       | 450    | 22290 |
| 22058 | LA FERRIERE         | KERHOUARN       | 533    | 22210 |
| 22059 | LE FOEIL            | FAOU-Sant-Brieg | 884    | 22800 |
| 22060 | GAUSSON             | GAOSON          | 806    | 22150 |
| 22061 | GLOMEL              | GROAVEL         | 2 132  | 22210 |
| 22062 | GOMENE              | GOMENE          | 718    | 22230 |

|       |                   |                  |        |       |
|-------|-------------------|------------------|--------|-------|
| 22063 | GOMMENECH         | GOMENECH 'H      | 552    | 22290 |
| 22064 | GOUAREC           | GWAREG           | 1 074  | 22570 |
| 22065 | GOUDELIN          | GOUDELIN         | 1 243  | 22290 |
| 22066 | LE GOURAY         | (Ar) GORRE       | 1 068  | 22330 |
| 22068 | GRACE-UZEL        | GRAS-UZEL        | 935    | 22460 |
| 22067 | GRACES            | GRAS-Gwengamp    | 1 435  | 22200 |
| 22069 | GUEINROC          | GWENROC 'H       | 249    | 22350 |
| 22070 | GUINGAMP          | GWENGAMP         | 11 297 | 22200 |
| 22071 | GUITTE            | GED              | 611    | 22350 |
| 22072 | GURUNHUEL         | GURUNHUEL        | 591    | 22390 |
| 22073 | LA HARMOYE        | LANHERVOED       | 555    | 22320 |
| 22074 | LE HAUT-CORLAY    | KORLE-UHEL       | 851    | 22320 |
| 22075 | HEMONSTOIR        | HENVOUSTER       | 470    | 22600 |
| 22076 | HENANBIHEN        | HENANBIHEN       | 1 431  | 22790 |
| 22077 | HENANSAL          | HENANSAL         | 1 016  | 22400 |
| 22078 | HENHOAT           | HENGOAD          | 362    | 22450 |
| 22079 | HENON             | HENON            | 1 889  | 22150 |
| 22080 | L'HERMITAGE-LORGE | (Ar) PENITI-LORJ | 691    | 22150 |
| 22081 | HILLION           | HELION-war-vor   | 2 235  | 22120 |
| 22082 | LE HINGLE         | (An) HENGLEUZ    | 562    | 22100 |
| 22083 | ILLIFAUT          | LEZFAOU          | 960    | 22230 |
| 22084 | JUGON             | JUGON            | 415    | 22270 |
| 22085 | KERBORS           | KERBORS          | 427    | 22610 |
| 22086 | KERFOT            | KERFOD           | 465    | 22500 |
| 22087 | KERGRIST-MOELOU   | KERGRIST-MOELOU  | 1 764  | 22110 |
| 22088 | KERIEN            | KERIEN-Boulvriag | 499    | 22480 |
| 22090 | KERMARIA-SULARD   | KERVARIA-JULAR   | 478    | 22450 |
| 22091 | KERMOROC 'H       | KERVOROC 'H      | 326    | 22140 |
| 22092 | KERPURT           | KERBER           | 536    | 22840 |
| 22093 | LAMBALLE          | LAMBAL           | 6 119  | 22400 |
| 22094 | LANCIEUX          | LANSEOG          | 1 214  | 22770 |

|       |                  |                      |        |       |
|-------|------------------|----------------------|--------|-------|
| 22095 | LANDEBAERON      | LANDEBAERON          | 299    | 22140 |
| 22096 | LANDEBIA         | LANDEBIA             | 357    | 22130 |
| 22097 | LA LANDEC        | AL LANNeg            | 396    | 22270 |
| 22098 | LANDEHEN         | LANDEHEN-war-ar-Maez | 742    | 22400 |
| 22099 | LANFAINS         | LANFEUN              | 978    | 22800 |
| 22100 | LANGAST          | LANGAST              | 778    | 22150 |
| 22101 | LANGOAT          | LANGOAD              | 1 067  | 22450 |
| 22102 | LANGOURLA        | LANGOURLA            | 895    | 22330 |
| 22103 | LANGROLAY        | LANGORLE             | 464    | 22490 |
| 22104 | LANGUEDIAS       | LANGEDIAZ            | 546    | 22270 |
| 22105 | LANGUENAN        | LANGENAN             | 792    | 22130 |
| 22106 | LANGUEUX         | LANGEOG              | 3 453  | 22120 |
| 22107 | LANISCAT         | LANISKAD             | 854    | 22570 |
| 22108 | LANLEFF          | LANLEV               | 117    | 22290 |
| 22109 | LANLOUP          | LANLOU               | 284    | 22580 |
| 22110 | LANMERIN         | LANMERIN             | 261    | 22300 |
| 22111 | LANMODEZ         | LANVODEZ             | 418    | 22610 |
| 22112 | LANNEBERT        | LANEBEUR             | 342    | 22290 |
| 22113 | LANNION          | LANUON               | 13 797 | 22300 |
| 22114 | LANRELAS         | LANRELAZ             | 1 234  | 22250 |
| 22115 | LANRIVAIN        | LANRIWEN             | 882    | 22480 |
| 22116 | LANRODEC         | LANRODEG             | 1 040  | 22170 |
| 22117 | LANTIC           | LANTIG               | 725    | 22920 |
| 22118 | LANVALLAY        | LANVALE              | 1 599  | 22100 |
| 22119 | LANVELLEC        | LANVELEG             | 649    | 22420 |
| 22120 | LANVEZEAC        | LANVEZEG             | 68     | 22300 |
| 22121 | LANVOLLON        | LANVOLON             | 1 249  | 22290 |
| 22122 | LAURENAN         | LOREUNAN-ar-Menez    | 977    | 22230 |
| 22123 | LEHON            | LEHON                | 2 436  | 22100 |
| 22124 | LESCOUET-GOUAREC | LESKOED-Gwareg       | 437    | 22570 |
| 22125 | LESCOUET-JUGON   | LESKOED-Jugon        | 522    | 22270 |

|       |                  |                 |       |        |
|-------|------------------|-----------------|-------|--------|
| 22126 | LE LESLAY        | LEZLAE          | 134   | 22800  |
| 22127 | LEZARDRIEUX      | LEZARDREV       | 1 842 | 22740  |
| 22129 | LOC-ENVEL        | LOKENVEL        | 126   | 22810  |
| 22128 | LOCARN           | LOKARN          | 860   | 22340  |
| 22131 | LOGUIVY-PLOUGRAS | LOGIVI-PLOUGRAS | 1 636 | 22780  |
| 22132 | LOHUEC           | LOUEG           | 493   | 22160  |
| 22133 | LOSCOUET-sur-Meu | LOSKOUED        | 700   | 22230  |
| 22134 | LOUANNEC         | LOUANEG         | 1 170 | 22700  |
| 22135 | LOUARGAT         | LOUARGAD        | 2 342 | 22540  |
| 22136 | LOUDEAC          | LOUDIEG         | 8 195 | 22600  |
| 22137 | MAEL-CARHAIX     | MAEL-KARAEZ     | 2 230 | 22 340 |
| 22138 | MAEL-PESTIVIEN   | MAEL-PESTIVIEN  | 800   | 22160  |
| 22139 | MAGOAR           | MAGOAR          | 220   | 22480  |
| 22140 | LA MALHOURE      | MALOUR          | 238   | 22640  |
| 22141 | MANTALLOT        | MANTALLOD       | 148   | 22450  |
| 22142 | MAROUÉ           | MAROUZ          | 2 153 | 22400  |
| 22143 | MATIGNON         | MATIGNON        | 1 440 | 22550  |
| 22144 | LE MEAUGON       | LANVAOGON       | 550   | 22440  |
| 22145 | MEGRIT           | MEGRIT          | 778   | 22270  |
| 22146 | MELLIONNEC       | MELIONEG        | 749   | 22110  |
| 22147 | MERDRIGNAC       | MERENIEG        | 2 770 | 22230  |
| 22148 | MERILLAC         | MAERILIEG       | 385   | 22230  |
| 22149 | MERLEAC          | MERLIEG         | 885   | 22460  |
| 22150 | LE MERZER        | AR MERZHER      | 608   | 22200  |
| 22151 | MESLIN           | MAEZLENN        | 571   | 22400  |
| 22152 | MINIHY-TREGUIER  | AR VINIC'HI     | 717   | 22220  |
| 22153 | MONCONTOUR       | MENEZ-AR-C'HONT | 1 187 | 22510  |
| 22154 | MORIEUX          | MORIEG          | 482   | 22400  |
| 22155 | LA MOTTE         | AN DUCHENN      | 1 473 | 22600  |
| 22156 | MOUSTERU         | MOUSTERU        | 537   | 22200  |
| 22157 | LE MOUSTOIR      | AR VOUSTER      | 514   | 22340  |

|       |                      |                      |       |       |
|-------|----------------------|----------------------|-------|-------|
| 22158 | MUR-de-Bretagne      | MUR                  | 2 231 | 22530 |
| 22159 | NOTRE-DAME-du-Guildo | ITRON-VARIA-ar-Gildo | 980   | 22550 |
| 22160 | NOYAL                | NOAL                 | 463   | 22400 |
| 22161 | PABU                 | PABU                 | 1 872 | 22200 |
| 22162 | PAIMPOL              | PEMPOULL             | 8 144 | 22500 |
| 22163 | PAULE                | POL                  | 962   | 22340 |
| 22164 | PEDERNEC             | PEDERNEG             | 1 635 | 22540 |
| 22165 | PENGUILY             | PENGILI              | 371   | 22640 |
| 22166 | PENVENAN             | PENWENAN             | 2 515 | 22710 |
| 22167 | PERRET               | PERRED               | 318   | 22570 |
| 22168 | PERROS-GUIRREC       | PERROS               | 6 913 | 22700 |
| 22169 | PEUMERIT-QUINTIN     | PEUVRED-KINTIN       | 295   | 22480 |
| 22170 | PLAINE-HAUTE         | PLENAOT              | 918   | 22800 |
| 22171 | PLAINTEL             | PLANDAEL             | 2 322 | 22800 |
| 22172 | PLANCOET             | PLANGOED             | 2 454 | 22130 |
| 22173 | PLANGUENOUAL         | PLOUGONWAL           | 1 461 | 22400 |
| 22174 | PLEBOULLE            | PLEBOULL             | 780   | 22550 |
| 22175 | PLEDELIAC            | PLOUDELIAV           | 1 390 | 22270 |
| 22176 | PLEDRAN              | PLEDRAN              | 3 172 | 22120 |
| 22177 | PLEGUIEN             | PLEGIAN              | 916   | 22290 |
| 22178 | PLEHEDEL             | PLEHEDEL             | 1 134 | 22290 |
| 22179 | PLEHEREL             | PLEHEREL             | 1 510 | 22240 |
| 22180 | PLELAN-Le-Petit      | PLELANN-BIHAN        | 1 127 | 22270 |
| 22181 | PLELAUFF             | PLELAV               | 842   | 22570 |
| 22182 | PLELO                | PLELO                | 2 084 | 22170 |
| 22183 | PLEMET               | PLEMED               | 3 065 | 22210 |
| 22184 | PLEMY                | PLEMI                | 1 748 | 22150 |
| 22185 | PLENEE-JUGON         | PLENE-JUGON          | 2 569 | 22640 |
| 22186 | PLENEUF-VAL-ANDRE    | PLOUNEVES-TRO-ANDREV | 3 797 | 22370 |
| 22187 | PLERIN               | PLERIN               | 8 902 | 22190 |
| 22188 | PLERNEUF             | PLERNEVEZ            | 425   | 22170 |
| 22189 | PLESIDY              | PLESIDI              | 898   | 22720 |

|       |                     |                 |       |       |
|-------|---------------------|-----------------|-------|-------|
| 22190 | PLESLIN             | PLOULENN        | 1 235 | 22490 |
| 22191 | PLESSALA            | PLESALA         | 2 071 | 22330 |
| 22192 | PLESSIX-BALISSON    | PLESIZ-BALUZON  | 152   | 22650 |
| 22193 | PLESTAN             | PLESTAN         | 1 317 | 22640 |
| 22194 | PLESTIN-les-Grèves  | PLESTIN         | 3 153 | 22310 |
| 22195 | PLEUBIAN            | PLEUVIHAN       | 3 533 | 22610 |
| 22196 | PLEUDANIEL          | PLEUDANIEL      | 1 187 | 22740 |
| 22197 | PLEUDIHEN           | PLEUDIHEN       | 2 318 | 22690 |
| 22198 | PLEUMEUR-BODOU      | PLEUVEUR-BODOU  | 2 542 | 22670 |
| 22199 | PLEUMEUR-GAUTIER    | PLEUVEUR-GAOTER | 1 399 | 22740 |
| 22200 | PLEVEN              | PLEVEN          | 1 015 | 22130 |
| 22201 | PLEVENON            | PLEVENON        | 765   | 22240 |
| 22202 | PLEVIN              | PLEVIN          | 1 015 | 22340 |
| 22203 | PLEUC-sur-Lie       | PLEUEG          | 3 202 | 22150 |
| 22204 | PLEZAL              | PLEUZAL         | 1 460 | 22260 |
| 22205 | PLEREC-sur-Arguenon | PLOREG          | 551   | 22130 |
| 22206 | PLOUAGAT            | PLOUAGAD        | 1 562 | 22170 |
| 22207 | PLOUARET            | PLOUARED        | 2 356 | 22420 |
| 22208 | PLOUASNE            | PLOUAN          | 1 821 | 22830 |
| 22209 | PLOUBALAY           | PLOUVALAE       | 2 156 | 22650 |
| 22210 | PLOUBAZLANEC        | PLOUVALANEG     | 3 656 | 22620 |
| 22211 | PLOUBEZRE           | PLOUBER         | 1 935 | 22300 |
| 22212 | PLOUEC-du-Trieux    | PLOUEG-Pontrev  | 1 280 | 22260 |
| 22213 | PLOUER-sur-Rance    | PLOUER          | 2 229 | 22490 |
| 22214 | PLOUEZEC            | PLOUEG-ar-Mor   | 3 481 | 22470 |
| 22215 | PLOUFRAGAN          | PLOUFRAGAN      | 5 109 | 22440 |
| 22216 | PLOUGONVER          | PLOUGONVER      | 1 388 | 22890 |
| 22217 | PLOUGRAS            | PLOUGRAS        | 670   | 22760 |
| 22218 | PLOUGRESCANT        | PLOUGOUSKAN     | 1 644 | 22820 |
| 22219 | PLOUGUENAST         | PLOUGENAST      | 2 057 | 22150 |
| 22220 | PLOUGERNEVEL        | PLOUGERNEVEL    | 3 133 | 22110 |
| 22221 | PLUGUIEL            | PRIEL           | 2 020 | 22220 |

A Z G I N I V E L E Z H A N H E B R A E G

gant H A I M R A B I N kelenner war ar yezh  
e Skol-veur Hebraek Jerusalem.

Troet e brezhoneg gant  
gant P A O L K A L V E Z

=====

Unan eus koshañ yezhoù ar bed eo an hebraeg. Abaoe  
3.300 vloaz ez eus bet savet er yezh-se levrioù talv-  
cudus war ar brederouriezh hag ar vuhêzegezh, ha  
dreist-holl ar Bibl, al levr en deus bet ar brasañ  
levezon war vab-den. En hor mare eo deuet da vezañ  
talvoudus-bras dre m'eo ar skouer nemeti eus ur yezh  
komzet a-nevez goude bezañ bet dilezet e-pad pell-  
amzer. Displegañ a raimp amañ berr-ha-berr penaos eo  
deuet da vezañ arveret en-dro.

Penaos e paouezas an hebraeg da vezañ komzet.

E Tell Amarna, e Bro-Egipt, e 1887, e voe dizoloet  
un niver a lizheroù bet kaset gant brenined eus Bro-  
Ganaan da roue Bro-Egipt er 14<sup>vet</sup> kantved a-raok ar  
marevezh kristen. E yezh v-Babilon eo skrivet al  
lizheroù-se, nemet ez eus enno un nebeut fazioù hag  
un nebeut gerioù kevyezh et a ziskouezh peseurt yezh a  
veze komzet gant ar skriverion anezho. Ur stumm kozh  
eus an hebraeg eo. Desket hon eus evel-se e veze komz-  
et hebraeg e Bro-Ganaan, zoken a-raok ma voe aloubet  
houmañ gant an Israeled. Anat eo e teskas Abraham hag  
e c'hourvibion komz hebraeg e-keit ha ma rejont o

annez eno. Anat eo ivez diouzh ar Bibl ha diouzh enskrivadurioù kavet war dammoù podoù-pri e douar Palestina e reas ar Yuzevien gant an hebraeg kepken a-hed marevezh an Templ kentañ. Pevar c'hantved goude an distro eus an harlu e Babilon e veze c'hoazh skrivet en hebraeg; met, tamm-ha-tamm, ez endro e yezh ar werin er stumm a gaver e kelennadurezh ar Rabined, evel m'eo anat er v-Michna (200 vloaz goude Jezuz-Krist) hag e skridoù-all eus an amzer-hont. Met e-doug prantad diwezhañ marevezh an eil Templ, e voe ret d'an hebraeg en em zifenn: Arameeg pe C'hresianeg e komze ar Yuzevien er-maez eus Palestina ha zoken kalz anezho er vro. Kresket eo bet er vro niver ar re na gomzent ket hebraeg da heul aloubadegoù ar rummad roueed "Hasmon" er c'hentañ kantved a-raok ar marevezh kristen. Gant brezelioù ar bloavezhioù 70 ha 132 e voe drastet Bro-Judea kreizenn an hebraeg ha paouezet d'ober gantañ er vuhez pemdez, hag eñ bet komzet e-pad pevarzek kantved.

A-raok ma voe paouezet da gomz hebraeg, o doa ar Yuzevien savet oberennoù a lennegezh e gresianeg hag en arameeg ha troet ar Bibl en div yezh-se. Gant an arameeg, yezh Talmudoù Babilon ha Palestina, e rae kenan ar Yuzevien; hag hiziv c'hoazh eo gant ar yezh-se e ra ar Yuzevien o chom e bro ar Gurded. En arabeg o deus ar Yuzevien skrivet kalz e-pad ar Grennamzer o broioù an Islam. Div yezh all diouto o-unan a voe savet ganto en Europa : ar yiddish hag al ladino. War al ladinaneg eo diazezet an hini gentañ, war spagnoleg

ar Grennamzer eben.

#### Al lennegezh hebraek o kenderc'hel.

Petra bennaq ma ne veze ket mui komzet an hebraeg er vuhez pemdez e-pad ar bloavezhioù etre 200 ha 1880, e veze neozh yezh an darempredoù etre Yuzevien o chom e broioù disheñvel. Tud daol 'zo a gomze hebraeg deiz ar Sabad; hogen, endra ma oa dibaot awalc'h ar boaz-se, n'eus morse bet paouezet da skrivañ en hebraeg penn-da-benn ar maread-hont. War-un-dro gant yezhoù all e veze skrivet : en arabeg e save Yuzevien Bro-Spagn o levrioù a bred-erouriezh, hogen en hebraeg e varzhonient; en hebraeg e skrive an eil re d'ar re all Yuzevien Vro-C'hall hag Alamagn eus an 10vet betek ar 14vet kantved. Yezh ar renkadoù tud desket e oa an hebraeg e Reteruropa. Pa grogas sevenadur Europa, e dibenn an 18vet kantved, da intrañ yoc'h ar Yuzevien, e voe dreist-holl a-dreuz da skridoù hebraek Emsav ar Sklerijenn (Haskala). Ar re-mañ a zilezas doare-skrivañ direizh ar Grennamzer hag a reas endro gant an hebraeg reizh. Barzhonegoù arnevez, pezhioù c'hoari, danevelloù berr, ha studiadenoù gouziek a voe skrivet; e 1854 e teuas er-maez ar gelaouenn gentañ en hebraeg, ur gelaouenn sizhuniek, Hamaglid.

Ken fonnus ha ken talvoudek ha lennegezhioù bras Europa e oa bet al lennegezh hebraek e-pad seitek kantved. Kantadoù a levrioù a oa bet troet diwar ar yezhoù all. Betek dibenn an 18vet kantved e vastas

al lennegezh hebraek da ezhommoù sevenadurel pobl ar Yuzevien. E penn kentañ an 19<sup>vet</sup> kantved avat e chomas kalz war-lerc'h. re all e diorreadur ar speredoù. Abalamour da gement-se ha d'ar c'hoant o doe ar Yuzevion d'en em heñvelaat ouzh o amezeien e koazhas hogos e pep lec'h an anaoudegezh eus an hebraeg.

War-dro 1875, e skrive ar barzh meur J.L. Gordon a-zivout diaesterioù ar re a fell dezho derc'hel al lennegezh hebraeg en he sav:"Piv 'c'h'all gwelout en amzer da zont? Piv a c'hell lavarout ha ne vin ket me barzh diwezhañ Sion, he c'hwi ar re ziwezhañ o lenn hebraeg?"

#### Aznevezidigezh ar spered broadel.

Da zreistezhomm e tremene pleustrezh ur yezh lennegel, yezh o zadoù-kozh ha pa vije, evit ar re speredekañ eus Yuzevien ar mare-hont; n'o doa ken uhelvennad nemet dont da vezañ "enbroadet" er broioù ma vevent. N'eo nemet goude progromoù Rusia e 1880 e teuas anat e oa enni hec'h-unan e ranke pobl ar Yuzevien klask un diskoulm d'he c'hudennoù dre en em adaozañ evel pobl o komz ur yezh a-ziforc'h. An hebraeg a zeuas da vezañ yezh an Hibat Sion, rag-emsav ar Sionegezh. Ha diouzhtu e tiwanas oberennoù a lennegezh e pep lec'h etre 1880 ha 1914. Da varead klasek al lennegezh hebraeg e tremen peurvuliañ ar bloavezhioù-hont gant skrivagnerion evel Ahad Haam, Bialik ha Tchernikhowski. Kelaouennoù pemdeziek a voe adalek 1886, hag er Stadoù-Unanet e krogas ar

Yuzevien d'ober gant an hebraeg. Mendele Mokher Sfarim (1835-1917) a savas neuze a-ziwar hebraeg biblek skrivagnerion an Haskala hag a-ziwar hebraeg Rabined ar Grennamzer, an hebraeg arnevez a anavezomp hiziv. Al liamm etre dassorc'h ar yezh ha dassorc'h ar genel a oa bet merzet splann, zoken araok ar progromoù, gant Eliezer Ben Yehouda (ganet e-kichen Vilna e 1858, marvet e Jerusalem e 1922). En nevez-amzer 1879 ez embannas ur pennad ma kinnige aozañ e Palestina ur riez yuzev a vefe kreizenn ar genel. Yezh kefridiel ar riez e rankje bezañ an hebraeg, ha war ar sol-se e tiwanje oberennoù puilh a lennegezh. E 1880, war an hent davet Palestina, e skrive kement-mañ : "Hiziv e komzomp yezhoù estren, warc'hoazh e komzimp hebraeg".

#### Komzet e vez ar yezh en-dro.

War an taol e krogas Ben Yehouda da bleustriñ e vennoz. E bourzh al lestr o c'hase eus Istamboul da Jaffa e komzas hebraeg ouzh e wreg. E vab, bet ganet e 1882, a voe bugel kentañ hor mare o komz hebraeg a-vihanik. Ur skrivagner e teuas da vezañ, Itamar Ben Avi e anv-pluenn. Tud desket o soñjal eveltañ a voe kavet gant Ben Yehouda e Jerusalem, peurgent e-touez ar Sefaraded a oa boas endeo da vont en hebraeg, evel ma veze graet er Grennamzer, ouzh Yuzevien dianav dezho al ladino hag an arabeg; en hebraeg e voe kaset, e 1885, an dael evit aozañ skol laik kentañ Jerusalem. Ober eus an hebraeg

yezh nemeti ar c'helenn evit stummañ ur remziad tud a raje ganti war ar pemdez, a oa da veno Ben Yehouda, an doare nemetañ da saveteiñ an hebraeg. Kerkent ha degouezhet e Jerusalem ez embannas er gelaouenn hebraek "Havatsleth" ur c'halvadenn entanet, o c'houlenn ma vije an hebraeg yezh skolioù ar vro. Da skolaer ez eas e-unan e 1883 met ret e voe dezhañ dilezel ar gefridi-mañ dre ziouer a yec'hed. En hebraeg penn-da-benn e veze kelennet e skol Richon-le-Sion, hag e 1888 e tivizas skolaerien eus Palestina ober gant an hebraeg hepken er skolioù. Kelennet e voe ar yezh er skolioù eil derez evel kelenndi hebraek Jaffa anvet hiziv kelenndi Herzlia, bet savet e 1906, ha kelenndi Jerusalem savet e 1908. Un nebeut skolioù ma veze an hebraeg yezh kentañ ar c'helenn a oa bet savet neuze gant ur gevredigezh yuzev-hag-alaman an Hilfsverein. Dre ma oa isdiorroet an hebraeg avat, eo en alamaneg e kavas gwelloc'h ar gevredigezh-hont kelenn an danvezioù kalvezel uhel er c'helenn-di kalvezel (an Technion) a vennas sevel en Haifa. Enebiñ taer ha trumm a reas neuze ar "Yichouv" : miliadoù a skolaerien hag a skolidi a zilezas ar skolioù evit aozañ kentelioù dindan an amzer. An trec'h a yeas en diwezh gant ar "Yichouv" en argad kentañ evit gwirioù an hebraegerien. Berzh a rae eta an argadadeg boulc'het gant Ben Yehouda, evel m'henn diskouez a-hend-all niveradegoù 1916-1918 : 40% eus poblañs yuzev Palestina, nemet Jerusalem, a gomze hebraeg (34.000 a dud), 54% eus ar vugale,

ha 77% e Tel Aviv hag er c'hêriadenoù.

#### An hebraeg anzavet gant ar riezoù all.

Evel unan eus ar yezhoù kefridiel e-kichen ar saozneg hag an arabeg eo bet anzavet an hebraeg gant feuremglev palestinat 1921. Er mererezh, e gwazadurioù ar Post hag, anat eo, en aozadurioù yuzev emren, e voe anzavet adalek neuze. Un niver a gelaouenoù pemdeziek ha sizhuniek, ur rouedad skolioù o vodañ hogos holl vugale ar Yuzevien, ar skol-veur hebraek savet e 1925, hag ul lennegezh puilh, a genlabouras da hebraekaat e gwirionez ar 576.000 Yuzev enbroet e-doug prantad ar feuremglev.

Gant doareoù galloudek e voe graet. "Ur vezh eo komz yezhoù arall", sed a voe strivet el liorzhoù-bugale hag er skolioù kentañ derez, sankañ e spered ar vugale a labouras d'o zro da silañ an hebraeg er gêr. Ar "Gdoud Megine Hassafa" (Lu Gwareziñ ar Yezh) a zalc'he bev birvidik ar garantez evit an hebraeg bep tro ma tegouezhe ur rummad nevez a enbroerien o komz yezhoù all. Hervez niveradeg 1948 nebeut goude ma voe savet Riez Israel, e oa 80% eus ar boblañs goust da gomz hebraeg ha 54% oc'h ober gantañ hepken en o darempredoù. Kalz a annezidi a oa endeo mibion tud o doa bet an hebraeg da yezh kavell.



### An hebraeg yezh-stad.

Pa voe savet e miz mae 1948 Riez Israel e teuas an hebraeg da vezañ en-dro ar pezh e oa bet 1957 vloaz a-raok, e grez ar roueed "Hasmon" : yezh ar riez. Petra bennak ma vez gwelet arabeg war ar pezhioù moneiz, an timbroù hag ar pester-henchañ, ne vez graet gant ar yezh-se nemet evit an darempredoù gant an Arabed, ha zoken, kalz Arabed a oar endeo hebraeg. Azginivelezh an hebraeg n'eo ket mui un uhelvennad hepken, un dra c'hraet eo, ha pep Israelad a ranko deiz pe zeiz komz hebraeg. E-kerz ar prantad enbrouezh a-vras e voe marcoù ma veze darbet d'an hebraegerien bezañ beuzet gant ar mor a aralvezherien. Hogen, desket e veze buan d'ar re-mañ an nebeut gerioù a rankent anavezout war dachennoù al labour, ar gedvuhez hag ar mererezh.

E 1967, e jeded e rae 76% eus ar boblañs gant an hebraeg da yezh kentañ o darempredoù. Jeded ez eus bet ivez e labourer bemdez en hebraeg 95% eus an 2.496.000 a dud o vevañ en Israel e dibenn 1969, petra bennak ma oa kalz anezho a gomze yezhoù all er gêr hag a lenne kelaouennoù en ur yezh estren.

Hebraekaat e vezo gant an amzer an darn vrasañ eus ar re-mañ. Ha, forzh penaos, dre ma 'z eus ur riez e vezo hebraegerien eus o bugale. Komzet e vez an hebraeg bremañ gant muioc'h a dud eget al lituaneg, an albaneg hag ar c'hembraeg. Unnek kelaouenn bemdeziek, kantadoù a gelaouennoù mareadek, ha tost 2.000 levr bep bloaz a vez embannet er

yezh-se, ha c'hwec'h skol-veur ez eus a gelenn dre an hebraeg hepken. Un nebeut riezoù (riezoù arab en o zouez a skingas bemdez abadennoù en hebraeg.

Pevar-ugent vloaz hepken goude ma tiwanas ar mennoz ha daoust ma ne greded ket re en dije graet berzh, eo bet adsavet ar yezh.

### Penaos eo bet arnevesaet an hebraeg.

Talvoudus a-walc'h e oa endeo an hebraeg e 1880 evit teurel barzhonegoù, studiadennoù, danevelloù, kendaeloù war ar brederouriezh, hag, anat eo, skridoù kravezel. Div dachenn eus ar vuhez a chome displeustr : an divizoù pemdeziek hag ar galvezouriezh. An hebraegerien o-unan a ziskoulmas kudenn an divizoù pemdeziek gant skoazell un nebeut skrivagnerien hag oc'h ober gant ur yezh nerzhik ha livek a vaste d'o ezhommoù, hep nemeur a zamant a-wechoù d'ar c'hlanvezhouriezh.

War dachenn ar galvezouriezh e voe strivet ar stroll da dennañ korvo eus barregezhioù ar yezh e mareadoù disheñvel hec'h istor evit sevel gerioù nevez. Gant Ben Yehouda e-unan eo bet boulc'het al labour-se. Dafar en deus dastumet evit ur geriadur, an Thesaurus, peurembannet e 1958, anezhañ 17 levr-enn hag ouzhpenn 8.000 pajenn. Geriadurioù all a-bouez a zo bet skrivet gant J. Gour (Grazovsky), J. Even-Chochan, hag all. Gant ar "Vaad Halachon" (Kehgor ar yezh) savet e 1890 eo bet kaset da benn ar pep brasañ eus al labour. Adaozet e 1904,

en deus an aozadur-mañ en em gouestlet da sevel ar reizhskrivadur hag ar yezhadur. Ur skoazell eo bet atav evit kement hini a c'hoantae bezañ titouret war dachenn ar yezh.

En henlennegezh hebraek eo e klaskas gerioù evit envel traezoù, binvioù, loened, plant, obererezhioù liesseurt, meizadoù difetis, pe skiantel. Miliadoù a furmoù nevez en deus tennet ivez diwar ar yezh a-vremañ, ha lakaet an dud d'ober ganto. E-barzh geriadurioù arbennik hag e stagadennoù ar gelaouenn drimiziec "Lechonennou" (Hor Yezh) eo bet embannet ar c'heriaoueg nevez-se. A-douez an tachennoù pleustret e c'heller menegiñ : ar gounezerezh, ar galvezouriezh, ar jedoniezh, ar fizik, ar gimiezh, al louzawouriezh, al loenoniezh, ar vredoniezh, ar vezekniezh, an hendraouriezh, an armerzh, ar stadegouriezh, ar jedouriezh, an dorwezhouriezh, ar sonerezh, an embregerezh-korf, ar moulerezh, ar c'heginerezh, h.a.

Akademiezh an hebraeg eo deuet da vezañ ar Vaad Halachon dre un dezvad eus 1954, enni gouizieien, skrivagnerien, barzhed. Doujet e vez d'he disenti- ezioù en holl aozadurioù ar riez.

Krog eo an akademiezh da sevel ur geriadur istorel eus an hebraeg evel m'eo testeniektaet abaoe 2.700 vloaz.

El lu ez eus ivez ur "c'hengor ar yezh" en deus fardet meur a dro-lavar adkemeret gant ar werin. Aozadurioù all ar riez o deus kenlabouret da

binvidikaat ar yezh. Dav eo menegiñ ivez ar gerioù nevez bet kavet gant ar gelaouennerien hag ar skrivagnerien. Kalz eus ar gerioù nevez savet avat, a zo act er-maez a c'hiz : seizh ger, da skouer, a voe ijinet da dalvezout "alumetez", betek ma chomas ar ger "gafrou", o tont eus "gofrit" (soufr), trec'h war ar re all. Gerioù eus an henezh eo darn eus ar gerioù nevez nemet ne oa ket bet tro d'ober ganto betek-henn. Ar ger "moussakh", da skouer, a vez kavet e Rouaned 2.16 da envel un doare lab e palez ar roue Salaun, a dalv kement ha "karrdi" abaoe 1940.

Er rannyezhoù arameeg bet komzet gwechall gant ar Yuzevien e c'heller a-wechoù kavout ar ger dereat.

Diouzh skouer ar gerioù bet ijinet en Europa e vez savet gerioù all. Setu penaos e teu ar ger "iton" (kelaouenn) eus ar ger "et" (amzer) evel en alamaneg "Zeitung" eus "Zeit".

Anat eo kreskerezh ar yezh diouzh an niveroù da heul : 8 000 ger disheñvel ez eus er Bibl; 37 260 a ya d'ober geriadur Even-Chochan, en o zouez 14 859 ger nevez, kalz eus ar re-mañ o tennañ d'ar galvezouriezh, hag unan bennak d'ar vuhez pemdeziek.

#### Perak en deus graet berzh an hebraeg.

Biskoazh yezh varv ebet n'eo deuet da vev en-dro : setu ar pezh a lavare tud'zo o komz a-zivout dazont an hebraeg er mare ma oa endeo war hent an adsav. Faziñ a raent evel m'hen diskouez stad ar

yezh en deiz a hiziv. Perak eo deuet a-benn an hebraeg da zasorc'hiñ endra ma c'hwite ar strivoù graet evit adsevel yezhoù all ha na oant ket holl peurvarv ?

Unan eus an arbennoù eo dres ne oa ket marv an hebraeg evit ar Yuzevien. Yezhoù da c'hortoz e oa d'o meno ar yezhoù a raent ganto e broioù an "diasporá" ha krediñ a raent e teufe an deiz ma tistrofent da Šion ha ma komzfent hebraeg. Mennoz Ben Yehouda a oa hepken e oa deuet ar mare hag e oa arabat gortoz da viken. Setu perak e sammas ar "c'hiboutzim" kentañ war o choug, daoust d'ar vuhez tenn a renet, un diaester ouzhpenn: komz ur yezh na anavezent ket mat. Asantiñ a reas ar re yaouank lakaat o deskadurezh en arvar evit ma vefe roet dezho en hebraeg hepken.

Anavezet e oa ar yezh avat, gant kalz enbroerien eus Retereuropa, Azia hag Afrika; en hebraeg e oant boas da lenn, da skrivañ, da zerc'hel o c'hontoù, ha dreist-holl da gas o buhez kravezel. Gant lennegezh an "Haskala" a brientas adnevezerezh ar yezh e oa bet silet an hebraeg e meur a dachenn eus ar vuhez. Kerkent ha 1863 eo en hebraeg e voe embannet kelaouennoù Palestina hag an darnvrasañ eus ar c'helaouennoù embannet e Retereuropa.

Ar boaz da skrivañ en hebraeg en doa prientet ar yezh da azasaat ouzh ezhommoù ar vuhez arnevez. Er Grennamzer e oa bet ijinet gant prederourion, kabalourion, studierien war ar gevrinouriezh

hebraek, ha kevyezherien, kalz eus ar gerioù arveret hiziv an deiz. Hogen an talvoudusañ eo an hentenoù o doa savelet, hag a zo bet heuliet gant Akademiezh ar Yezh hag aozadurioù all evit pinvidikaat hor yezh a-vremañ.

N'eus forzh penaos ne oa ket tu da adsevel bro ar Yuzevien hep adsevel an hebraeg : ar yezh nemeti a oa boutin d'an holl Yuzevien. Ar yiddish hag al ladino a oa komzet gant darnoù hepken eus pobl ar Yuzevien hag ar re n'o anavezent ket n'o dije ket degemeret ur yezh na vije ket bet liammet ouzh o zremened evel pobl. Ne vije ket bet tu da zibab ur yezh evel ar saozneg ha da rediañ an enbroerien da ober ganti, rak evit bezañ Yuzevien eo e teuent ha n'eo ket evit eskemm un arallekadur ouzh un all. Azginivelezh ar bobl yuzev a emlege azginivelezh ar yezh hebraek.

Reoliet eo bet an enbroañ en doare ma ne vije strollad enbroerien ebet niverus a-walc'h evit skignañ dre ar vro ar yezh a gomzent. Al liamm nemetañ eo bet an hebraeg etre tud o komz yezhoù disheñvel. Ha dre m'eo aet war baotaat ha war stankaat an darempredoù etrezo e trec'has tamma-tamm an hebraeg war ar yezhoù all zoken er vuhez prevez. Saozneg a vez studiet er c'helenndioù hag er skolioù-meur, ha, nevez'zo, e c'hoantaer deskiñ galleg. Kelaouennoù pemdoziek ez eus e saozneg, galleg, alamaneg, arabeg, yiddish, poloneg, hungareg, roumeg ha bulgareg, ha kelaouennoù

sizhuniek er yezhoù-se hag e yezhoù all. Ar yiddish (c'hoariva, kanaouennoù, lennegezh) bet ken dismegeañset gwechall a vez studiet bremañ gant plijadur er Skol-veur hebraek koulz hag al ladino (spagnek ar yuzevien).

Petra eo an hebraeg arnevez.

Petra bennak ma 'z eus bet savet kalz gerioù ha kalz troioù-lavar nevez evit hebraekaat kealioù eus ar sevenadur arnevez, e chom an hebraeg tostoc'h c'hoazh ouzh yezh ar Bibl komzet tri mil bloaz'zo eget ar saozneg a-vremañ ouzh yezh Chaucer komzet pemp kant hanter-kent vloaz'zo. A-wechoù zoken eo tostoc'h ouzh yezh ar Bibl eget hini ar vMichna' seitek kant vloaz'zo. Kement ger ha kement tro-lavar bet arveret e-kerz an Istor a zo aet d'ober an hebraeg arnevez. Ar pezh n'eo ket lavarout, evel ma soñje da dud'zo, ez eus bet miret ouzh ar yezh a greskiñ anezhi hec'h-unan. Tost daou vil bloaz'zo endeo, pa voe savet ar pedennoù pemdeziek e voe mesket furmoù kozh ha furmoù nevez an hebraeg. Diouzh an doare-se e reer mui-ouzh-mui en hon amzer. Lavarout a c'heller, evit komz berrha-berr, e vez tennet eus ar Bibl furm ar gerioù hag eus yezh ar "vMichna" furm ar frazennoù, daoust ma 'z eus un nebeut gerioù dibabet e pep mare hag e pep doare-skrivañ. Setu perak e vez meur a zoare bet graet ganto e mareoù disheñvel evit lavarout an dra-mañ-tra. Daoust ma sav niver ar gerioù tennet

eus ar Bibl da 10% hepken eus ar c'heriaoueg a-vremañ, eo ar re-se a vez arveret ar muiañ : biblek eo 65% eus gerioù ar c'helaouennoù.

Pinvidikoc'h ha gwevnoc'h eo ar yezh arnevez pa c'hell ober gant arlivioù liesseurt. A-wechoù e reer gant gerioù 'zo er prezegennoù hag el lennegezh, ha gant gerioù all e yezh ar pemdez. Setu perak e vez souezhet alies ar re o deus studiet an hebraeg en estrenvro gant an doare ma vez komzet ar yezh en Israel. Mar asantont d'an diforc'hoù-se gant hegarated, evel ma ranker ober da geñver pep tra en Israel, e teuint a-benn da esmaeañ ouzh an doare m'o deus Israeliz graet eus ur yezh a levrioù ur yezh a vuhez pemdeziek.

A-hed ar c'hantvedoù eo bet disheñvel distagadur an hebraeg er sinagogennoù : distagadurioù sefaradek, ashenazek, yemenek, norzafrikaek, persek, h.a. Distagadur sefaradek Israel a vez graet eus an doare distagañ a zo tost a-walc'h ouzh hini Yuzevien Bro-Spagn ha broioù all Europa. Ar re yaouank dreist-holl a zistag gant nerzh ha buan-kenan en ur verraat ar gerioù. Disheñvel eo distagadur Israeliz hervez ma 'z int genidik eus Kornogeuropa pe eus ar broioù arabek, hervez ma vevont e kêr pe war ar maez.

O tibab an distagadur sefaradek o deus Ben Yehouda hag e genlabourerien, Yuzevien eus Rusia an darnvuiañ anezho, distaolet a-ratozh o rannyezh hengounel. Diwar studi ar gerioù hebraek tremenet

e yezhoù Europa e voe anat dezho e oa an distagadur sefaradek hini an hebraeg er mareoù ma oa ur yezh komzet. An distagadur ashkenazek ne sav ket uhel-oc'h eget derou ar Grennamzer.

#### Ar sevenadur hebraek.

Talvoudegezh ur yezh n'eo ket diouzh ar pezh ez eo enni hec'h-unan na diouzh niver an dud a ra ganti, hogen diouzh an talvoudoù sevenadurel he deus kenderc'het. En hebraeg ez eus bet savet e korf 3.000 bloaz un niver a oberennoù lennegel eus an dibab en istor ar Spered; ha, zoken, lennet e vez c'hoazh kalz anezho en hebraeg : da gentañ holl ar Bibl, hogen ivez ar vMichna, liesmammennoù an Haggada, barzhonegoù Yehouda Halevy, Salaun Ibn Gabirol ha barzhed all eus ar Grennamzer, prederiadenoù ar c'hevrinour Bahya Ibn Pakoula, re Yehouda Halevy, Maimonidez, ha prederourien all a'r Grennamzer a skrive diwar an arabeg pe war-eeun en hebraeg. Nevez'zo ez eus bet dizoloet dornskridoù e-kichen ar Mor-Marv a zegas ur sklerijenn nevez war al lennegezh hebraek e derou ar marevezh kristen.

Kresket eo bet al lennegezh-se abaoe azginivel-ezh Israel, n'eo ket hepken gant skridoù Mendele, Bialik, Tchernikhovsky hag Ahad Haam, hogen ivez gant re skrivagnerien all bet ganet en "diaspora", hag a zo deuet evel an tri all d'ober o annez en

Israel. Menegomp peurgetket ar varzhed Zalman Schneour, David Shimoni, Yitshak Lamdan, Ouri-Zvi Greenberg, Abraham Shlonsky, Sh. Chalom ha Nathan Alterman; ar barzh ha c'hoarivaour Yakov Cohen, ar varzhez Rachel ken kizidik, ar c'hoarivaour Mata-tiahou Shoham; ha marvailherien evel J.L. Peretz, M.Z. Faierberg, M.Y. Berdichevsky, U.N. Gnessin, J.Ch. Brenner, A. Barach, Avigdor Hameiri, Ever Hadani, Dvora Baron, A.A. Kabak, I. Shenhar, H. Hazaz, J. Twersky, hag ar brasañ anezho holl, S. I. Agnon, a voe roet dezhañ ar priz Nobel war al lennegezh e 1966, hep komz eus un niver bras a skridvarnerien, a studiadennerien, a helenneien engouestlet o buhezioù da studi an danvezioù hollvedel koulz hag istor pobl ar Yuzevien.

Meur a c'hoariva ez eus, uhelgalvezek ha dar-empredet-stank. Menegomp ivez ur fiñskeudennerezh war e zerou.

Ur remziad skrivagnerien yaouank bet ganet er vro abaoe an eil brezel bed, hag int awenet gant ar mennozioù o ren er mare-mañ, a vez dedennet mui-ouzh-mui gant istor ha buhez ar Yuzevien. Ledanaet eo bet tachenn al lennegezh hag ar pezhioù-c'hoari skañv. Gant ar vro eo awenet un niver bras a ganaouennoù pobl, ken barzhonius ar c'homzoù hebraek anezho gwisket gant tonioù dam-reterek.

Penaos e ra an enbroerien evit deskiñ hebraeg.

Meur a zoare kelenn ez eus bet savet abaoe 1948 Evit lakaat an enbroerien da zedeuziñ buan ha peuregetket ar re anezho a rae micherioù oc'h emplegañ kalz arver ar yezh. Dleet eo meuliñ da gentañ ar c'helenndioù anvet "oulpanim" kaset en-dro gant kelennerien leun a-skiant-prenet. Un annezskol eo peurvuiñ, evezhiadennet gant Maodiern an Deskadurezh hag ar Sevenadur ha renet gant Maodiern an Dedeuziñ ha gant ar Gouraterezh Yuzev. Pemp miz e pad ar rummad kentelioù gant 30 eurvezh studi bep sizhun (600 eurvezh bennak en holl enta). An tiegezhioù a c'hell mont en "oulpan"-ostaleri ma vezont disammet diouzh o bugale evit en em ouestlañ penn-da-benn da zeskiñ an hebraeg. "Oulpanim" ez eus c'hoazh evit ar skolidi o chom en diavaez eus ar skolioù, hag o labourat a-hend-all. E-barzh ar c'h"Kiboutzim" e kinnig an "oulpanim" d'ar re yaouank peurgent ur reizhiad kentelioù c'hwec'h miz. Daouhanteret e vez an devezh etre al labourdouar ha studi an hebraeg. Er c'hreizenoù dedeuziñ e vez roet kentelioù fonnus d'ar grennarded. Skolioù-meur Israel a aoz evit o studierien arallvro rag "oulpanim" ha kentelioù hebraeg liesderez a-hed ar bloavezh skol. Kalz gwelloc'h eget ar c'hentelioù diouzh an abardaez pe ar c'holc'hioù studi a veze diouzh ar c'hiz a-raok 1948 eo an "oulpanit" savet gant pep mererezh-kêr. Bloaz d'an nebeutañ e pad ar studioù gant eizh pe zek eurvezh

kentel bep sizhun; diouzh ar beure evit ar merc'hed a labour en o zier, ha diouzh an abardaez evit ar vicherourien.

Studi an hebraeg en "diaspora".

An Aozadur Sionek Hollvedel en deus strivet kalz evit kas war-raok dre ar bed studi an hebraeg. Kalz a gelennerion eus Israel ez eus bet kaset en "diaspora". Evel-se en deus kroget Israel da silañ e-touez Yuzevien ar bed-holl un darn eus an herezh sevenadurel a zevoudas ar sionegezh. Estrenien yaouank mennet da vezañ kelennerien war an hebraeg a zeu da dremen bloaz pe zaou en Israel e-barzh unan eus an daou gelenndi dalc'het gant an Aozadur Sionek e Jerusalem. Gant doareoù kelenn liesseurt, adalek Skol ar Sul er sinagogennoù betek ar C'helenndi hebraek, o deus un drederenn eus bugale ar Yuzevien e broioù ar C'hornôg gallet piaouañ un elfenn bennak eus ar sevenadur hebraek. Evit an dud en o oad gour e vez aozet kentelioù ivez. Heverk eo ouzhpenn-se an doug d'ar studioù hebraek e kalz a skolioù-meur en USA, Kanada, Europa ha Latinamerika. Kelennerion eus Israel a vez pedet alies da gelenn en estrenvro. En USA ez eus war-dro daou c'hant skol-veur a ro kentelioù war al lennegezh hebraek arnevez, ouzhpenn ar re a gelenn an hebraeg evel yezh klasek. Anat eo d'an holl talvoudegezh an hebraeg. A-walc'h eo reiñ an tu d'en deskiñ.

Lieskrivet gant ar gelaouenn CFFP 50 015 Ar Benar: Y. Ollivier

